





AC'HANN DA BEUR ETA , O VA JESUS,
HEM LESSOT AMA? NAK A VALL AM
BEUS DA ELLOUD HO KOELET EN' HO
PARADOS !



AN
INDULJANSOU.


Landerneau, Imp. Desmoulin Fils

FB
265
GS
ARZ



Neus fors pe seurt a rign, ato her grign e Jesus ;
 Gat netra ne gavign blaz nemet gat Jesus.
 Ed an deis ne dennign lagat divar va Jesus ,
 Ak en noz va speret a ureo e Jesus.
 Va huriou a va mestr e vezo va Jesus.
 Krog e viot em dourn pa skrivign, o Jesus ,
 A Jesus a skrivo an hano kaer a Jesus.
 Biken c'hoari ne rign ma n'ema eno Jesus.
 En hænt e vign atau troad oc'h troad gat Jesus.
 Pam bo n'aoun pe zec'het , va bouet e vo Jesus.
 Pa vign klân eo do kaout e zign, o va Jesus.
 Ar yec'het a dui dign eus a Galoun Jesus.
 E tre divrec'h Jesus e varvign e Jesus ;
 A va guer diveza a vezo : Jesus , Jesus !!!
 Evit va sebelia e teuot , o va Jesus ,
 Evit bez n'em bezo nemet Kaloun Jesus ;
 Varna e vezo skrivet : KOUSKET EO E JESUS.

Evelen bezet great !



UR GUER BENNAK EVIT AN NEB EN
 DEVEZO AR VADELEZ DA DEULEUR E ZAOU-
 LAGAT VAR AR PEZ ZO AMA
 VAR LERC'H.



Mo pe en oc'h amezegues un tyad tud
 ak a ouffac'h a ve o tua gat an naoun , ne
 veac'h ket evit miret no pe trues outo ;
 a kris aoualac'h e veac'h ive ma no pe
 ket. Hoguen me garre gouzoud e pe le-
 ac'h var an douar e ouffe beza kement a
 izom evel a zo er purkator ? A douetus e
 zeus eno eus o tud, eus oc'h anaoude-
 yen, piou a c'hoar ? nak a zo eno mar-
 teze o tiouaska poan , a n'emint en tan
 nemet abalamour deoc'h-hu ! A ne ve-
 ac'h ket eta kriz ma choumfac'h eb soun-
 jal rei sikour ebet dezo, a c'hui o elloud
 hen ober ? Eb dale marteze e tui ho tro
 da vont eus ar bed-ma ; ar pezh a ellan da
 lavaret deoc'h, ak a ouzoc'h oc'h hunan,
 eo ne joumot ket atau ama ; diouallit eta
 na veac'h lezet oc'h hunan eb sikour un
 deis a zui ; un dra eo ak a disse en hem
 gaout d'oc'h a reot.

ne daoleur ket aoualac'h a eves; 1^o Ar pes a reomp en doare-ze, a peguen dister bennak e ve lavaret e ve, a laka deomp etre hon daouarn ur guir nevez da veza paet gat Doue er bed-all a da gaout kement-se muioc'h a c'hloar er barados, pa dui hon tro da vont un deis da gaout hor barneur. Ar guir-ze zo evidomp hon-hunan a n'oump evit he rei da zen all; rak dioutha eo e vezo roet deomp hor c'hurunen e gloar ar Barados. *Er bed all, eme Zant Paol, e vezo roet da beb hini dioc'h m'en devezo great ama.* 2^o Un dra all zo c'hoas en hon oberou mad; ma ve en hor bues tremenet un dra bennak ak a elfe hon stroba a miret ouzomp da vont buan aoualac'h d'ar c'hloar goude hor maro, e ellont c'hoas dieubi deomp an hant en ur baea un darn da vihana eus ar pes a renkemp, a var hon tremen-van or bezo kement-se nebeutoc'h a zale.

Ar pez zo evelenn en hon oberou mad, ak a ell sikour paea ar pez a rankemp, ne dle ket c'hoarvoud gata

evel gat ar guir var ar barados a goumaemp anezha bremaik. Ema a veleur aoualac'h n'oar evit he rei da zen all; hon unan on devezo izom anezha pa zaimp dirak an Autrou Doue; a kaer e vezo deomp kaout ne gavo ket deomp neuze on deffe re; hoguen ar pez zo en hon oberou mad ak a ell paea hon dle ne dalo deomp da zeurt pa vessimp e gloar an Autrou Doue; eno ne vezo mui a zle da baea. Perak eta ne elfemp ket he rei da zikour hor breudeur ak hor c'hoarezet ma non deus ket a izom evidomp hon hunan?

Ec'heist pa veac'h souezet oc'h va c'hlevet, a douetus e livirit ennoc'h oc'h hunan : *Daoust eta pe leac'h ema ar re o deus re? En taill mo divije aoualac'h e vije gras gatho.*

Evit guir, ne vije ket al lod-ze ma vije an oll ken didalves a ny, ak oc'h ober evel a reomp. Hoguen, a drugare Doue, nak hen zo bet ed ar veach a eneou a n'edont ket en doare-ze! Taolit eta ho taoulagat var Sant Yan Vadezour. Lakit he bec'hijou ak

he oberou mad e kénver e kenver :
 Huguén he bec'hijou, da belec'h zo-
 ken e zeod d'ho c'hlsk? Mar de bet
 sklabezat gat pec'het Adam, ne oue
 nemet ar c'hoec'h miz kenta ma zoa
 anezha; tri mis araok m'oa deuet var
 an douar oa kaer evel un eal, ak a
 c'houdeves keit a ma eo bet var an
 douar ne gaffot ket en he vues ar
 skeud zo ken eus a ur pec'het. Chetu
 a-ze eta ar pez a renke. Deuomp bre-
 ma d'he oberou mad. Nak a zánves a
 gaffot en he vloas pe zaou vloas a tre-
 gont? Ar c'hoant da ober kement a
 rea evit gloar an Autrou Doue a ioa
 ken doun en he galoun eus adalek he
 vugaleach m'ac'h en em dennas eus
 a douez an dud ec'heist m'oue deuet
 da gaout skiant evit mont el leac'h ne
 vije muy nemet an Autrou Doue ak
 hén. Ne rea van eus a nikun eus an
 traou krouet nemet e kement a ma
 ellent sikour anezha d'en em zével
 varzu an Autrou Doue; a hænt all
 n'en doa pe raje gatho. Gouzoud a
 rit ar binijen a rea; ne zebre nemet
 evit miret na varfche gat an naoun,

un nebeud griziou louzou ak eus ar
 c'hoarennou mel a gave e goask ar
 vein. Evit en em c'holo n'en doa ne-
 met kroc'hen eur c'hanval — Petra
 livirit c'hoas eus a Sant Jochim a San-
 res Anna, Tad a Mam an Itron Varia?
 eus a Sant Joseph kemeret evit beza
 Tad maguer da Jesus-Krist, ker kaer
 oa he vues dirak an Autrou Doue;
 eus an ebessel o deus kemeret ke-
 ment all a boan evit prezek an Avel
 dre bevar c'horn ar bed, a da bere e
 lavare Hor Salver he hunan : N'HO
 KALVIGN MUY NEMET VA MIGNOUNET? a
 kaout a ra deoc'h ne ve ket eat ar
 re-ma oll en tu all d'an dle o doa?
 — Nak a gafemp c'hoas e toues bu-
 gale an Autrou Doue ak a ioa paet
 kement a renkent mil bell araok ho
 maro! A gouskoude nak a oberou
 santel en ho bues! Ne ket o skan-
 benni nak o toui Doue eo e vezent pa
 stourme un dra bennak outho; n'ho
 c'hlevet ket zoken oc'h ober ur glem-
 maden. *Emoump, emezo, etre daou-
 arn an Autrou Doue, a kement zo
 great gatha eo atau ar guella; ous-*

pen-ze a goelloc'h oump-ny eguet Jesus-Krist Hon Tad? Doue en doa roet dign danves a yec'het, Doue en deus ho lammet diganen, ra vezo meulet he hano santel; oc'h ho c'hemeret n'en deus great nemet kemeret ar pezh zo dezha, etc..... Nak hén a dlie oberou en doare-ze taloud dirak an Autrou Doue! Sounjit c'hoas er re a leze skuilla ho goad a lamet ho bues digatho kentoc'h eguet ober netra a guement a elje ober an disterra poan d'an Autrou Doue! Petra gaf deoc'h a zounje an Autrou Doue divar benn tud ar seurt-ze? Ak eus bet gouskoude kement anezho, pe guir epad an tri c'hant vloas kenta ebken eus guellet kounta ouспен unnek million a verzeurien!

Nak eta an Itron Varia a ioa adalek ar penn kenta ma oue anizhi kaeroc'h dirak an Autrou Doue eguet ar Sant ar re vrasa en heur eus ho maro! ak e tleit kredi ne ket var laoskaat e zea e kenver an Autrou Doue dre ma teue oad dizhi, er c'hontrol eo; a birviken teod den ne ouffe lavaret ar garantés

a io en he c'haloun evit he Doue ak ar boan a guemere da ober kement a rea evit he c'hloar. C'hoas a gafimp e bues or Mam; sulvuy a joa a vez oc'h hunan bennak, sulvuy a boan a vez ive pa veleur ober drouk dezha; deskit eta ac'hano peguen doun ne dlie ket sank a kaloun an Itron Varia ar pezh a vele bemdis da ober d'an Autrou Doue! Nak eta pa velas ar pezh a reat d'he Mab Divin, he dreina dre ar guear ar Jerusalem evel pa vije bet ar falla den a ioa bet biskoas var an douar, hoguen ispicial pa her goelas oc'h ar groas a zistribill a boues tri pe bevar sach! Nak a zle a elle kement all a draou kaer da baea! A gouskoude biskoas ene an Itron Varia ne deo bet sklabezé gat an disterra pec'het; ne deus eta biskoas ranket seurt an oll d'an Autrou Doue evit he fec'hijou.

Kaeroc'h gouskoude zo c'hoas. Jesus-Krist, Hon Tad, a zo bet falvezet gatha dre garantés evidomp en hem ober den; kemeret en deus ur c'horf ak un ene, a bet eo o chom en hon

toues. Nak a draou kaer en tri bloas a tregont en deus tremenet var an douar! Santeles an Itron Varia a zo bras evit guir; nak a zo gouskoude da lavaret etre ar Verc'hes Vari ak Hor Salver! A mar deo ispicial dre ar pezh a gavomp a zies, ak a zoare aoualac'h eo evit diski skiant deomp a pa na ve ken; a ne ket o veza bet an anter re zo gat an traou krouet eo on deus-ny en hem gollet? m'ar deo, a lavaran, dre ar pezh a gavomp a zies e fell d'an Autrou Doue e teuemp ispicial da baea ar pezh a rannomp evit or pec'hijou, e peleac'h eta ho c'hafimp, an danvez kaer-ze a blij kement d'an Autrou Doue, evel e buez hon Tad? Ganet eo e kreiz ar baourentes, en ur c'hraou, eb me divije an Itron Varia nemet un dournadik kolo da lakat dindanna, ak hen gouskoude ar guir berc'hen eus a guement zo! Keit a ma eo bet var an douar eo bet paour. He hunan a n'en deus hen ket lavaret : *al lern o deus ho c'heo da vont ebars da joucha a Mab an d'en n'en deus ket ul leac'h*

dre elloud herpel he benn varnezha? Epad he dregont vloas kenta piou var an douar a c'houye petr'oa nemet ebken an Itron Varia a Sant Joseph? Edo e toues ar re a yoa krouet gatha, a den ne brije ober van anezha! Epad he dri bloas diveza nak a boan o klask lakat an dud da zont enno ho hunan! Klevet oc'h eus mil goech petr'en doue da c'houzaon ak er gear a Jerusalem ak ispicial var menez Kalvar! Ak evit ma vellac'h goelloc'h petr'eo ar priz eus a guement all a zanves, digassit en ho speret petr'oa an neb a c'houzanve kement all. Doue oa! goelit eta neuze petra dalie kement berad c'hoezen zo bet biskoas oc'h e dal! An distera anezho a ioa aoualac'h evit prena ar bed oll, a mil all gatha!

G. — Ar madou kaer-ze zo chomet eus a zillac'h Hor Salver ak an Itron Varia, ar pezh zo bet a re e bues an eneou eurus ak eat e vent-hi da goll?

R. — *Hor Salver*, em'en Abostol Sant Paol, a kement a zo bet biskoas ak a vezo birviken a gristenien ne

reont nemet ar memes karf. Jesus-Krist eo ar penn eus ar c'horf-ze a ny ken etrezomp eo an izili, etc... Chetu aze eta penaus ema Hor Salver ak he vugale entrezo; hoguen en ur c'horf kement zo a zo boutin etre an izili : ar pezh zo a re evit lod a zo evit ar re all. Goelit eta pa vez klan neus fors pehini eus an izili nak a boan a guemer ar re all evit klask he zikour. Ne c'hedont ket zo ken ma teuet da lavarret dezho. Evelse ive eus a guement zo choumet eus a zilac'h Hor Salver ak an eneo eurus n'eus ket eat zo ket ur vrujunen da goll, ak ar c'hoant a zo eo e zaemp da guerc'had eus ar madou-ze dre m'on devezo izom. Lakeat int gat an Autrou Doue etre daouarn he bried Hor Mam Santel an Ilis en deis ma roas dizhi an oll c'halloud e deus izom evit lakat e vugale da vont var eun d'ar barados goude ho maro. Felloud a ra dezha zuz e deffe atau he bried peadra da zikour he bugale beveh ma tuint d'he c'haout, ak a betra bennak e elfent caout izom. — A d'an tenzor kaer-ze e za ive an Ilis

beyehe ma ro deomp Induljansou; ac'hano e tenn ar madou divin-ze o deus ed ar veach bet ar zeñt kement a vall da gaout. Guir'eo en ur guinnik anezho deomp e fell dizhi e raemp un dra ive eus or c'hostes hon hunan. A felloud a rae deomp kaout anezho d'an ampoent ma vemp oc'h ober goassa guelless ! Nebeuta a ouffet da c'houlenn diganeomp eo ma kemeremp ar boan da drei hor c'halloun varzu an Autrou Doue pa vezeur oc'h ober kement all evidomp, a peurvuya ive ne rear ken. Petr'eo ar pezh a c'houlennneur peurliessa ? Ur bater bennak, ur yun pe zaou, etc..... An dra-ze gouskoude a zo astud e skoas d'ar pes a renkeur d'an Autrou Doue, ma karret he zounjal !





EIL PENNAD.

G. — Ak izom or-be-ny a Induljansou?

R. — Va Breur, na petra livirit eta gouskoude ! Ma vijac'h eus an eneouze zo bet atau en aoun rak ar pec'het, neuze ne lavaran ket ; hoguen un den eveldoc'h, kaout c'hoas ar galoun da barlant evel pa ve bêt un eal eus an eên o lavaret deoc'h ne rankit zo ken seurt an oll d'an Autrou Doue !

Taolit eta ho taoulagat var oc'h amzer dremenet, grit ur red d'ho pues adalek m'oc'h eus bet skiant betek vrema Chench liou a rit, a skrija a rit oc'h va c'hlevet ! a ne ket soues e rac'h ; nak a zerveziou, a noz-voziou, piou a c'hoar ? a viziou ak a vlaveziou zo ken marteze a velit en ho pues tremenet a ma ve ret deoc'h kaout ennhou keit a ma vezeur o lavaret teir fater ak a ve bet roet a vaniel Vad d'an Autrou Doue e veac'h nec'het, douetus bras ! Ne ket gat an

Autrou Doue edo oc'h atapi d'ar mareze eus ho pues ; no poa ket amzer var ho meno, ne dizac'h sounjal nemet en ur goal youl bennak da behini o poa roet ho kaloun ; nos a deis noa nemet an dra-ze o rodella en ho penn ! Nak a bec'hijou marvel d'ar mare-ze eus ho pues ! A c'hui a elle zo-ken choum un tachadik an distera eb ober goassa guellac'h d'an Autrou Doue ! Ya, ma vijø bet an Autrou envel ouzoc'h, m'en divije ho kalvet neuze da vont dirazha e pe leac'h e vijac'h-hu brema ?

C'hoas a gafac'h gouskoude ma karac'h digueri ho taoulagat. Goelit eta un den ak a zo taguet he galoun gat ar pec'hijou mezus eus ar c'hik. Betek neuze oa un ebad kaout affer outha ; n'oa ket evit lavaret : *gaou a leveres*, da ur c'hraouadur. — An deis var lerc'h he bec'het it eta da velet petre deuet da veza ! Ne deo muy ar memes doare den ; goella m'eo iviziken eo da lakat he dud da ranna ho c'haloun a da zizec'ha divar ho sreid ; ne rai fors petre da ober na da lava-

ret ; goerza a rai he nessa ken alies a ma kavo an dro, etc., etc..... Evelse ema an eil pec'het o chacha eguile. Ar pez a zo goassa, ar pec'hijou-ma d'ho sro, ur veach mo deveze guellet kaout krog en ho kaloun a jache varnizi ker goaz da neubeuta ak ar goal youl e doa roet dor zigor dezho ; kouls ak hi e reant deoc'h koeza aliessoc'h eguet bemdis ; a, deuet ur mare a veze, n'oa muy dioc'h kount e reant deoc'h ive ober an drouk ; he lounka a reac'h evel an dour!..... Petra livirit eus ar mellezour oc'h eus aze dirak ho taoulagat ? Ak en hem anaout a rit enna ? Goelit eta neuze petra ouc'h bet ! A lavaret a reot evel atau : pebes izom am beus-me a Induljan-sou ? Ak ar galoun o pe d'he lavaret ? Evit eus a un dra e tleit kaout izom.

Deuomp brema d'an amzeriou-ze eus ho pues e pere e zeac'h goelloc'h. N'oac'h na laer, na roulleur ; kaz ho poa oc'h kement a denne d'al loudour-riachou eus ar c'hik, etc..... A gouskoude mar kirit sellet piz, nak a slabez a gaffot eno ive, siouas ! Guir eo

e reac'h avisiou ar mad ak alies zo ken, ak an dra-ze eo a ra hirio ho choa ; rei a reac'h an aluzen ; mad oac'h da deuleur an dourn evit sikour an neb a velac'h re veac'h dezha, etc..... Na petr'oa deoc'h ober an dra-ze ? A gat ar c'hoant da ober plijadur d'an Autrou Doue oa ? Salokras ; n'her greac'h nemet evit ma vije kaos ac'hanoc'h, evit ma vijac'h meulet. Fur oac'h, evit ar goel ; fae oa ganeoc'h mont da drezenna d'an tavarniou ; labourat a reach a dress en hem laza, etc..... Na perak ? Ho taoulagat a ioa o para var ar re o doa peadra etre o daouarn, var ar re a yoa er c'hargou ak a yoa deuet mad gat tud ho bro ; avi o poa outho, c'hoant da vont keit ak hi, ak en tu all zo ken mar gueljac'h..... Ak an Autrou Doue petr'en deus bet eus a guement all a oberou ? Ne dizac'h ket zo ken sounjal ennha ; re a dresu a ioa var ho korf ! Nak a skoultrou fall eta a goella m'int eo da deuleur en tan ! — Goassoc'h a reac'h. Klevet a reac'h an Autrou Doue o skei var dor ho ka-

loun, a gouzout a reac'h brao-meur piou a ioa eno o parlant ouzoc'h; a van ebet a reac'h evit he glevet? bouta a reac'h ho tiskouarn, trei a reac'h ho kein gat an aoun o poa na deujac'h da c'houzoud petra lavaret deoc'h! Petramant e taolac'h ho taoulagat da zellet en dro deoc'h da velet a den a ioa dirak, evel po pije mez gat an Autrou Doue! Ne ket evelse a rit pa ouzoc'h e vez ur goennek'ben-nak da c'hounid; c'hui a ra fors-zus neuze ak e ve an oll o c'hoarzin deoc'h! A chetu aze ar pezh a reac'h kant goech bemdis d'an Autrou Doue, d'ar mareou kaer-ze eus ho puez, a goelit goude a leac'h en deus da gaout ebat gat tud en doare-ze?

Pa dosteac'h oc'h ar sacramanchou ne brijac'h kemeret poan ebet da velet petra ellac'h da veza great; ho pec'hejou a veze kountet evel ur rispu-den, eb keus na glac'har; ne ouiac'h ket zo ken petr'oa an dra-ze. Epad meur a vloas marteze a c'hui oc'h eus sounjet ur veach er boan a ra ar pec'het d'an Autrou Doue ak en izom

ho poa d'he zigoll goude beza great kement all dezha? Beb er mare e velet ac'hanoc'h oc'h taol an Autrou Doue, a d'an ampoent ma veze Hor Salver en ho kaloun petra gavae da lavaret dezha? Ne dizac'h ket, kement a draou all a yoa var ho speret!..... Ak evelse a rac'h d'an neb a deuffe d'ho ty evit ho koelet?

A m'ar d'oac'h kel laosk ak evelse e kenver an Autrou Doue, petre da zounjal eus ar pezh a dliac'h d'bonessa? M'ar choumit re hir eb boueta ho korf eo sklear petra c'hoarvezo; ho ners a c'hoasto prestik ak eb dake ne ellot mui chom en ho sa; evelse ive un deis a zui nak a sklabez ur vech c'hoas a vellot er blavezio-ze a gavit hirio ker kaer all! hunan pe hunan a veze atao en ho koulou; ec'heist ma velac'h vad da un all ne ouyac'h mui petre da ober; edoc'h e doare un den ak en deus kollet an anter frank eus a guement en doa! Nak a ebad o poa-hu o kounta kement a ouyac'h! a c'hoas ma vije c'hui o pije lavaret an traou evel mo peze clevet anezho! Nak

a droidelleres pa veze un taol kaer bennak da ober; kement a ioa a veze mad evidoc'h neuze!

Ak an dra-ze gouskoude eo a c'hede Hor Salver diganeoc'h? livirit dign; ak en doare-ze a rea ar Verc'hes ak ar zent? nak eta ar pec'hijou ouc'h bet kaos d'ar re all da ober, a kaout a ra deoc'h e koezo ar pec'hijou-ze d'an douar? Ar pezh zo goassa, ar re oc'h eus lakeat evelenn da bec'hi a ne anayent ket marteze an drouk ken na douc'h-hu deuet d'he ziski dezho a veze mall gatho d'ho sro he ziski da re all; en doare-ze ar pec'het a zo en hem ledet dre bevar c'horn ar vro; na piou zo bet penn kaos eus a gement all a zrouk nemedoc'h-hu?

G. — Souezi a ran oc'h ho klevet, eme c'hui; a n'oun-me ket eta bet o koves? meur a veach zo ken em beus-me parlantet eus an traou-ze e konfession. Petre deoc'h eta dont adarre da lakat anezho dirak va daoulagat?

R. — Me yelo larkoc'h eguedoc'h. Anzavet oc'h eus a drugare Doue kement oc'h eus great biskoas betek-

enn, ak ar pezh zo c'hoas kaeroc'h an Autrou Doue en deus pardounet oc'h oll bec'hijou deoc'h; hoguen chetu ama un dra all a n'oc'h eus ket marteze sounjet enna. En ur bardouni ac'hanoc'h ak ho kreat en deffehen kuit a pare en evelep fessoun ne rankac'h mui seurt dezha iviziken? Marteze en deus he c'hreat; he c'hreat en deus zo ken mar en deus kavet aoualac'h a guez ak a c'hilac'har en ho kaloun. Hoguen a leac'h oc'h eus da gridi o pe bet ar c'hilac'har-ze d'ho pec'hijou pa vezac'h o koves anezho? Diouallit da en hem droumpla.

Adam n'en doa great nemet ur pec'het; anzañ a ra ar pezh en deus great; keuz en deus, ne ouffo kaout ken evit urgoel da vihana, he bardouni a rear evit guir; hoguen klevit eta petra levereur dezha : *iviziken no pezo bouet da zibri nemet dioc'h ar c'hoezen eus ho tal; poan o pezo ak a gorf ak a speret, klenvejou a stourmo ouzoc'h, a zo ken mervel a reot, etc.....*

Ar Roue David a anzañ ive ar pezh en deus great ak he bardouni a rear;

hoguen ar c'hraoudur en deus bet a varvo, ak he hunan iviziken a keit a ma vezo var an douar n'en deus da c'he-dal nemet kroaziou a beb seurt a lakai anezha da ranna he galon a da zizec'ha divar he dreid.

Taolit ho taoulagat var ar pinijen-nou a rea ar zent ak hi o kaout kement a leac'h da gridi oant pardounet gat an Autrou Doue. — Diskennit ispicial a speret e kaloun ar Purkator; eno e ellot goelet, e pe du bennak e taolit ho taoulagat, ar pezh a dlear c'hoas peurvuya d'an Autrou Doue goude beza bet ar pardoun digatha. Neus ket hunan eno na ve eus a vignounet an Autrou Doue, a goelit gouskoude ar pezh ho deus da c'houzaon, a var be seurt goeleou int gorvezet!

Hoguen oc'h hunan, p'en devez un all great gaou ouzoc'h, noazet deoc'h en ho madou, en oc'h henor pe en ur c'hiz-all bennak, ak aoualac'h e kasse deoc'h e ve ma teuffe an denze da anzaou ouzoc'h ar pezh en deus great, o tiskoes kaout keus da veza

great kement all? Ar pezh a rit aze a zo mad, a lavarrac'h; kaer eo zo ken; c'hoas gouskoude a c'hedan diganeoc'h; va sra oc'h eus lamet diganen; he gaout a renkan pe guir e ellit he rei. A ne ket an dra-ze a livirit oc'h hunan bemdis?

Na dit ket eta da lakat en ho speret e ve aoualac'h anzaou ar pec'hijou a kaout an absolven anezho. An Autrou Doue zo ive o c'hedal un dra evit ar boan on deus great dezha en ur bec'hi. A roet oc'h eus-hu deza ar pezh a renkak'h? a lakeat oc'h eus-hu etre he zaouarn kement o poa lamet digatha evel ma lavarac'h ober pa oue roet an absolven deoc'h? Siouas evidoc'h, ma teuffe an Autrou Doue d'ho kerc'hat hirio ac'hann, blaveziou eo o pe da dremen e kaloun ar purkator ne ket evit hunan ebken pe zaou, hoguen, skrija a ran oc'h e lavaret! evit peb hini marteze eus an oll bec'hijou marvel zo bet biskoas pardounet deoc'h! Araok an absolven e vijac'h choumet en tan ed an eternite; iviziken abalamour d'ar zae venn a

zo guisket deoc'h a nemet sklabeza anizhi a rac'h adarre a mervel e goal stad, hirra ma ouffac'h choum eo betek fin ar bed ; hoguen pa roet deoc'h an absolven, ma no poa nemet eken ar pez a ioa ret a c'hlac'har evit ma vije goalc'het oc'h ene, goelit eta neuze nak a joum ganeoc'h da baea ak a baeot gouskoude, kaer e vezo deoc'h, er bed all ma n'oc'h eus ket he c'hreat er bed-ma ; a zo ken non devezo dor zigor er barados nemet roet or be betek an diveza diner ! a taolit brema d'ho kount da velet pet pec'het marvel a ellit da veza great abaoue ma zeus ac'hanoc'h ! Hoguen un dra eo a ne deuot biken a benn anezha. Muy douetus bras a bec'hijou marvel oc'h eus great eguet na deus a vleo var ho penn.

Ur veach gouskoude ma vezac'h bet o koves e veze ken eas ho speret, ak iviziken ne brijac'h muy sounjal en amzer dremenet. *Pinijen*, eme c'hui, *a zo roet dign pa oun bet o koves a great em beus anizhi, etc.....* Ar zent ive a rea kement a veze lavaret dezho

pa vezent o koves ; hoguen goelit ar pez a reant ouzpen ! pebes bern dle o pezo da ziresta hunan eus an deiziu-ma, ma na guirit diouall ! a c'hoas betek-enn non deus ket lavarret ur guer divar benn ar pez a rankit evit kement all a bec'hijou veniel a verniit bemdis a gantchou ak a viliou an eil var gorre eguile ; a gouskoude adalek ma zint pec'hijou neus hini apezho na raë ur boan ar vrassa d'an Autrou Doue ; ak abars ma zeot d'ar barados, o pezo paet kement a renkit evit ar re-ze kouls ak evit ar re-all. Digoromp hon daoulagat, ene kristen, justiss an Autrou Doue a c'houlle he guir ak he gaout a renko. Pait eta ; essoc'h eo deoc'h, ak un toullad zo ken, paea ama eguet hen ober er bed all.


G. — Esklami ac'hanon à rit, eme c'hui, na peur biken em bezo-me eta paet kement all ?

R. — Siouas ! ya, trist eo hon doare, a trist ne ouffe beza ken ? Evelse ive a ne ouzoc'h-hu ket ar pez a lavare an Abostol Sant Paol : *keit a ma viot*

ama iviziken e tleit beza atau e doare un den ak a zo dindan veac'h-kaer e dezha ober? Ur c'hraess eo gouskoude evidomp e vemp adarre eus a vignounet an Autrou Doue a n'or be muy leac'h ebet da gaout aoun rak an ivern peur bennak e tui an Autrou Doue d'hor guervel ac'hann; a pa n'or be gounezet nemet an dra-ze en ur gaout an absolver, eo atau kals evit tud evel domp-ny a no doa ken da c'hedal nemet beza da virviken gat an diaoul. Hoguen mar kaf-deoc'h oc'h eus re da ober petre ne dit eta da gaout hor mam santel an Ilis? klevet oc'h eus pebes danves kaer zo lakeat dizhi e tre e daouarn; an danves-ze zo deoc'h kouls a da oll vugale an Autrou Doue, ak a boues en hem zikour oc'h hunan peguer buhan no pe ket paet gatho kement a renkit evit ho pues tremenet! re all o deus ho gounezet; hoguen ar re ma int dezho eo Jesus-Krist he hunan, an Itron Varia, an Eneou eurus eus ar barados; ak ar c'hoant o deus eo da velet ar beac'h eat divar ho kein! Ma ouf-

fac'h ar joa a rac'h dezho o lezeur anezho da ober evidoc'h!

C'hoas zo; ak e veac'h eus an eneou-ze zo ker mignoun d'an Autrou Doue, ak a zo gat ho fedennou ak ho oberou santel o terc'hel ar bed-ma en he za; peguer sur bennak e ouffac'h beza da veza paet kement a renkac'h evit ho pec'hijou tremenet, e livirign deoc'h evel atau : Ene mad, goelit eta nak a zanves a laka an Autrou Doue dirazoc'h! poaniit d'ho gounid; gounezit zo ken ar muya ma ellot; ne deo nemet evit an dra-ze e lakear anezho dirak ho taoulagat. Ma noc'h eus ket a izom evidoc'h oc'h hunan, nak a re all a gaffot ak a zo e poan! Pa dui ar poent da vont dirak an Autrou Doue c'hui o pezo joa oc'h ar pez o pezo great evit sicour an Anaoun!





TREDE PENNAD.

G. — Ak ar memes muzul e deus
atau hor mam Santel an Ilis pa ro
deomp eus an danves kaer-ze?

R. — Ne deus ket; ar pezh a ro de-
omp aviziou en deus kement a dalou-
degues neus affer a guen evit paea
kement a rankemp da justiss an Au-
trou Doue, ak e rankchemp zus ke-
ment all, a zo ken tri mil goech mui
eguet na reomp, a ma varfemp dioc'h
tu goude beza he c'hounezet e zaemp
rak eneb d'ar barados, nemet ur pe-
c'het veniel bennak or be var hor
c'houstians a non deffe ket c'hoas bet
ar pardoun anezha. An Indulgansou
plenier kennebeud nak an Induljan-
sou all ne ket evit goalc'hi hon ene e
roeur anezho deomp; an dra-ze a zell
oc'h ar Sacramant a Biniyen. Paea ar
pezh a ranket evit ar pec'hijou par-
dounet a ellont; hoguen ive ne ellont
ken.

Peurvuya gouskoude n'oump ket
evit beza sur da veza gounezet an In-
dulgansou plenier, abalamour n'oump
ket evit goelet sklear aoualac'h a bez
on doa ar pezh a ioa ret a gueus ak a
c'hlaç'har en hor c'hâloun. Hoguen
poaniomp evel atau beveh ma el-
limp en hem gaout e tro da c'hounid
madou ker kaer all. Ma ne c'houn-
zomp ket kement a guinniguer de-
omp, oump sur da vihana da gaout
un dra, mar keromp; bez'on devezo
zo ken dioc'h ar volontes vad a velo
an Autrou Doue enomp. A ma n'oump
ket evit beza sur da veza gounezet an
Indulgansou plenier pa ves evidomp
hon hunan eo e vezomp o klask gou-
nid anezho, n'oump ket evit beza sur
kennebeud pa ves evit an anaoun eo
on deus c'hoant d'ho gounid. Neus
ket eta re da gridi d'an Indulgansou
dre bere e levereur e vezo tennet a
boan un ene eus ar purkator; an
dra-ze a ell beza guir; hoguen n'oump
ket evit beza sur.

Indulgansou all zo ak a zo diste-
roc'h, dre exempl : Indulgansou a

zeis vloas, a ur bloas, a gant derves, etc..... Ar seurt Induljansou-ze, pa ho gounezeur, o deus ar memes taloudegues dirak an Autrou Doue evit diresta ar pes a renket d'he justiss evel ar piniennou a reat goechall dre urz hor mam Santel an Ilis epad ar memes amzer; da lavaret eo, bemdis c'houlou epad seis vloas, ur bloas, kant derves, etc... Peguement a burkator a akuitet goechal gat ar piniennou-ze? un dra eo a ne c'hoes-simp nemet divezatoc'h, douetus bras, pa vessimp e gloar ar barados; hoguen keit a ma vezimp ama bevech ma c'hounessimp Induljansou a zeis vloas, a ur bloas, etc..., e verreomp hor purkator eus a gueit-ze. Taloud a reont eta ar boan d'ho gounid.

G. — Petra zo da ober evid gounid an Induljansou?

R. — 1^o Ret eo da vihana kaout c'hoant d'ho c'haout. Traou ker kaer all n'emint ket a re e ty hor mam Santel an Ilis; pell dioc'h eno. Pennaus eta e teuffe da rei anezho deomp ma ne vel ket on deffe c'hoant d'ho

c'haout? Ne ket ret gouskoude e ve ar zouch-ze en hor speret pa en hem gavomp e tro da c'hounid an Induljansou, kennebeud nak evit renta ar pes a reomp din eus a c'hloar ar barados; re a drues en deus an Autrou Doue oc'h sempladures an den; n'on deus ken da ober nemet beb mintin en ur zihuna, pe da vihana en hor pedennou lavaret a galoun : *felloud a ra dign kaout an oll Induljansou a en hem gavn e tro da c'hounid hirio, etc...*, neus affer a guen.

2^o E renkeur beza e stad a c'hrass. A felloud a ra deoc'h e teuet da bardouni ar purkator da un den ak hen o veza d'an ampoent-ze un dra ken euzus ne ell ket zo ken an Autrou Doue sellet outha? Ma varfe er stad-ze e ve ranket serra dor ar barados ak he deuleur e kreis kaloun an ivern ak e souch deoc'h petra! E ouffe an Induljansou beza evit tud en doare-ze! ur c'halanna int ak ar c'hamera zo ken a ouffe an Autrou Doue da rei deomp er bed-ma goude ar Sacramanchou; hoguen ive ne ro anezho

deomp nemet leac'h en deffe da veza kountant ac'hanomp. Ma kaf deoc'h eta n'emouc'h ket e stad vad, kenta oc'h eus da ober ma n'ouc'h ket evit mont da goves eo goulén a greis ho kaloun pardoun digat Doue. Evit gounid an Induljansou plenier e renkeur zo ken kaout ur guir c'hlaç'har da guement pec'het veniel a ouffet da veza great, a kaout ar galoun e guiriones distak dioutho oll. Penaus e fell deoc'h e teuffe an Autrou Doue da bardouni deomp ar pes a renkomp evit ur pec'het, ak e ve zuz ken dister all, epad m'eo marteze joa ganeomp beza great anezha? — Pa ves goulennet meur a dra evit gounid an Induljansou ne ket ret gouskoude e vet e stad a c'hrass oc'h ober peb hini anezhe, hoguen e stad a c'hrass e tleaz beza pa rear an dra ziveza eus ar pez zo goulennet. Neuze eo e c'hounezeur an Induljansou.

3^o Evit kement seurt Induljansou zo e zeus atao goulennet un dra diganeomp. Ret eo kaout souch mad da ober kement zo lavaret, d'hen ober

an human ak en doare ma zeo merket. Aoualac'h eo mankout en human pe human eus ar poenchou-ma evit na elfet ket gounid an Induljansou. Ar re zo bouzar a mut a c'hounezo an Induljansou a boues, 1^o mont d'an Ilis bevech ma c'houlennour e zaet, a pidi eno a speret ak a galoun; 2^o ober ar pes a verko dezho ho c'honfessour e leac'h ar pedennou ak an traou all; 3^o mont gat ar re all pa vez evit pedennou publik em'an Induljansou, a pidi a galoun goella ma ellint.

G. — A ret eo mont da goves?

R. — Evit kals Induljansou e c'houlennour ma vet bet o koves; neuse neus ket affer da c'houlén. Hoguen ar re zo boas da vont beb sizhun da goves a ell gounid an oll Induljansou a en hem gav var ar zizhun eb mo deffe izom da vont adarre araok ho foent kustum, nemet e vessint e stad a c'hrass. E kals eskoptiou zo ken e c'hoare ar memes tra evit ar re a vez o koves beb pemzek derves. Ar re ne vezont ket ken alies-zé a ell, mar keront, mont da goves en deis a guer-

rint eus an eis derves zo araok ar gouel ma zeus Induljansou da c'hounid, a zo ken e ellont gounid an oll Induljansou plenier a elfe en hem gaout epad an eis derves goude ho c'honfession a boues ober ar pes zo goulennet, ak eb ma ve ret dezho mont adarre da goves, nemet e ves-sint e stad a c'harrass.

AR GOMMUNION.

Pa c'houlennour ar Gommunion evel a rear evit an darnvuya eus an Induljansou plenier, e elleur ober anizhi d'an deis araok ar gouel, pa zigor an Induljansou d'ar gousperou kenta.

Pedennou zo ak a zo Induljansou bras oc'h ho lavaret evel ar Chapelet, an Angelus, an De profundis, etc. ... ; an Induljanzou-ze a elleur da c'hounid o lavaret anezho gat re all, an eil o respount oc'h eguile, kouls ak oc'h ho lavaret an hunan.

G. — Petra dlear da entent pa levereur eo ret pidi erves intansion hor mam Santel an Ilis?

R. — Da lavaret eo, e ret goulenn : 1° Ma tui an oll da garet an Ilis evel ho mam ; 2° Ma tui ar guir Religion d'en hem skigna e toues ar re nint ket c'hoas kristenien ; 3° Ma tui ar re a nac'h ur poent bennak eus hor feis pe ne anavezont ket hon Tad Santel ar Pab evit beza ar penn eus an Ilis da zont enno ho hunan ; 4° Ma reno ar peoc'h e tre ar re a zo e penn ar broyou ; 5° E tlear pidi evit hon Tad Santel ar Pab.

INDULJANSOU A ELLEUR DA C'HOUNID EVIT AN ANAOUN VAD.

G. — Ak e stad a c'harrass eo ret beza evit gounid anezho ?

R. — Evit darn anezho, ispecial an Induljansou plenier e c'houlennour ma vet bet o koves ak o kommunia ; neuze eo sklear n'oar evit gounid anezho nemet bet e vet e stad a c'harrass ; pa ne ves guer a confession nak a gommunion, petra bennak ne ket evidomp hon hunan e fell deomp gounid anezho, a peguer kaer bennak e

ve dirak an Autrou Doue an eneou da bere on deus c'hoant d'ho rei e vije salo gouskoude e vijemp hon hunan e stad a c'hrass.

An Induljansou-ze ur vech gounezet a ya oll gat an eneou da bere on devezo roet anezho, a kement hon divije gallet da ziresta eus hon dle hon hunan a joumo var hor c'hein ak a rankimp da rakuita divezatoc'h. Hoguen mar kollomp eus a un tu e c'hounezomp eus a un all. Neus seurt ak a bliche d'an Autrou Doue evel goelet he vugale oc'h asten an dourn evit sikour ar re zo e poan; pae gaer on devezo eta evit ar pezh hon devezo great, a sulvui a boan hon devezo kemeret da zikour an Anaoun, sul gae-roc'h e vezo ar guranen a vezo lakeat deomp un deiz var hor penn. Eus ho c'hostes ive an eneou on devezo sikouret, ur vech ma vessint er c'hloar ne vezo ket dare dezho ankounac'hat ar re o devezo sikouret anezho. Ober a raint ive divezatoc'h evidomp, ak un toullad en tu all d'ar pezh on devezo great evitho; e leac'h koll eo

gounid eta a reomp o c'hounid Induljansou evit an Anaoun.

Pa ves c'hoant da c'hounid Induljansou evit an Anaoun e tle ar sounjal evit piou e felleur gounid anezho. Mad a raet gouskoude sounjal en un all bennak, ma ne ve ket an neb zo sounjet enna en izom; dre exempl, er re ma vemp bet kaos dezho da goeza er purkator; er re o deus great vad evidomp pa edont var an douar, er re no deus muy den da gaout souch anezho, etc.....


An Induljansou zo evit ur gouel bennak a c'hounezour divezatoc'h pa vezo great ar gouel, ma ne rear ket anezha d'he zeis. Pa vez Induljansou en un Ilis bennak ne ket ret mont da gommunia d'an Ilis-ze; ar gommunion a rear en Ilis a guereur; hoguen ret eo mont un tachad da bidi d'an Ilis ma ema an Induljansou da c'hounid.

Poaniomp eta da c'hounid an Induljansou bevec'h m'en hem gavimp e tro. Ober a rear kement all evit gounid un nebeud arc'hant! A petr'eo

gouskoude an oll danves, ak or be anezho, e skoas d'an disterra eus an Induljansou? Gat madou an douar e ellomp evit guir kaout bouet da zibri, ty da vont ebars, dillat d'en hem c'holo, louzeyer a tud var hon tro pa vezomp klân; hoguen ive n'oump evit kaout ken; a gat an Induljansou e verreomp hor purkator; guelloud a reomp zo ken en hem lakat e stad da vont rak-eneb d'ar barados ec'heist ma varfimp! Nak eta ar vad a ellomp da ober d'an eneou zo o tiouaska poan e tan ar purkator! ak eus hon tud hon hunan e zeus ive eno, douetus bras.

Na zounjet ket deomp gouskoude n'on deus eta iviziken seurt da ober hon hunan pa gavomp re all da ober evidomp. Er c'hontrol ret e deomp poania eus hor c'hostes hon hunan ak ober zo ken kement zo en hor galloud. Neuze en devezo an Autrou Doue trues ouzomp; rak goelet a ra ak e vemp oc'h ober an anter muy eguet na reomp, dibaot e elfemp dont a benn da ziresta an deok eus ar pezh

a renkomp, ak e choumfeomp zuz kals blaveziou c'hoas var an douar. Hoguen mar goel ive ne reomp netra, e lezo ac'hanomp. Ne ket evit maga feneantet e roeur deomp an Induljansou.





EIL KEVREN.



BREURIEZIOU.


En amzeriou kenta eus ar Relijion , ne veleur menek ebet a Vreurieziou , da vihana e doare ar re zo brema. A da betra ive, d'an ampoent m'oa an Autrou Doue karet evel ma zoa, a no doa he oll yugale nemet ur memes kaloun ak ur memes ene ? An Ilis a bez a ioa neuze evel ur vreuries, a kement a ioa a gristenien dre ar bed a ioa oll entrezo evel breudeur a c'hoarezet. Gat an amzer gouskoude e teujeur da laoskaat ak e kenver an Autrou Doue ak an eil e kênver eguile. Eas eo koumpren ar boan a rea d'hor mam Santel an Ilis goelet he bugale o yenaat en doare-ze evel pa vijent skouis o kerzet en hant ar barados.

Evelse ive evel ur vam vad e deus ed ar veach great kement a ioa en he galloud evit klask ho diarben a miret na dajent da goll. Un dra ispicial ak en deus great ne ouffet ket lavaret peguement a vad eo ar Breurieziou. Pa ves ive kement all a eneou mad o pidi var un dro, o c'houlén ar memes tra, pe o poania da enori ar memes guiriones, penaos e fell deoc'h ne ve ket klevet ho mouesgat an Autrou Doue ? Ak hén o lavaret deomp en Aviel : *el leac'h ma vezo daou pe dri o pidi en va hano, me vezo ive gatho !*

Un dra all gouskoude a c'hed c'hoas hor mam Santel an Ilis digat ar re a ya en ur vreuries bennak ; n'eus seurt ak a bliche d'an Autrou Doue evel goelet an dud oc'h en hem garet ak oc'h asten an dourn evit en hem zikour pa veleur hunan bennak en izom ; evelse ive e fel dizhi e ve kement a ya en ur vreuries bennak evel breudeur a c'hoarezet entrezo, ak ac'hano zo ken eo e teu an hano a vreuries. Pa vesint boaz da veza en doare-ze mad an eil e kenver eguile ne vezo netra de-

zho beza ar memes tra e kenver an oll. Bez e tleont beza evel tud un ty entrezo, a zo ken kement a reont eus a oberou ar vreuries a dle beza lakeat e boutin evit mo devezo an oll vreudeur ak an oll c'hoarezet ho lod eus a guement a ra peb hini eus ar re zo eus ar memes breuries gatho. Sklear eo eus souch e poanfie peb hini da ober ar pes a ell eus he gostes. Peguen dizoare ne ve ket ive e ve un darn oc'h ober goella guellont a kountant da rei eus ar pez a c'hounezont d'ho breudeur a do c'hoarezet d'an ampoent ma ve un darn all eb ober netra! A ma n'eus pec'het ebet o choum eb ober ar pez zo merket er Vreuries e choumer da vihana eb kaout netra eus ar pez a vije guellet da c'hounid, a just aoualac'h eo. Ar re n'emint ket e souch mad da ober kement a zo merket en ur Vreuries a rae ive goelloc'h, a kals zo ken, choum eb mont ebars. Anes e vet evel pa vet o klask ober goab eus ar Breurieziou; ar pez ne dleffe plijoud nemeur d'an Autrou Doue. Goelet a rear ive hinien-

nou ak a garfe beza e kement breuries a glevont parlant anezho; goelloc'h eo beza e nebeutoc'h a Vreurieziou ak en hem akouita mad eus ar re ma emeur enno.





BREURIES AR SAKRAMANT.

Ur Vreuries ak a goessie beza prez o vont ebars eo breuries ar Sacramant, ak ar c'hontrol eo. Un trues eo zo ken goelet ar pes a rear d'an Autrou Doue er Sacramant eus an Auter! Ken alies a bemnos eus a zalek kuz-heol betek sao-heol e lezomp Hor Salver he hunan kaer, a ma ve great deomp ur veach er miz ebken koll un heur gousket evit mont epad an nebeudik amzer-ze dirak ar Sakramant, n'oun dare a ne gaffe ket deomp e vet o klask laza ac'hanomp! Hor Salver gouskoude ne zell ket ker piz-ze oc'h he boan; ma raje ive! e koessie zuz trues ouzomp! epad an anter vad eta eus an amzer Hor Salver n'en deus ket ur c'hristen var e dro!

Na var an deis, epad ma vezomp var vale, a mui a zouch on deus-ny anezha? Da zul evit guir, evit

c'hoas da vihana, ne ket tud a vank va dro an Ilizou; roues eo zo ken ar re ne deuont ket ak ho diskoes a rear gat ar bes; hoguen a gat ar vall zo da elloud tremen un tachad gat Hor Salver eo e teuar beh sul d'an Ilis? N'oun dare; ar pes a ouzon eo e kustumomp da zul ive skouiza buan un estoun e ty an Autrou Doue. Ne lakaemp hon treid en Ilis nemet d'ar poent diveza, eu aoun emichians da ober re ak ur c'hals zo er meas pell araok ma ves echu an overn pe ar gousperou; koll ho amzer a reont, a gaf dezho! un toullad e c'hounessint hirroc'h o fumi ak o ragachad en un tu bennak. Ya, eme c'hui, *hoguen ive an seurt-ze a zo kemeret ganeomp evit bris-tud.* — Goelomp eta petra ra ar re all. Goude ma ves echu an Overn pe ar gousperou kemerit ar pes zo ret a amzer evit lavaret pemp. Pater a pemp Ave Maria, ak it goude d'an Ilis da velet a kals a gafot ebars! pa ves joa oc'h hunan bennak a kement-ze a vall a ves ive da vont dioutha? penaos. kerkent a ma elleur kaout an dro? Ar rest

eus an deis ne vezo ket dies kennebeud kounta ar re a gafot dirak ar Sacramant. Chetu aze penaus e tremenomp ar sul, a gouskoude ar sul eo deis an Autrou Doue!

Var ar zizhun it d'an Ilis d'ar poent a guerrot e kaffot un ty goullou. Eo, dioc'h ar mintin e vezo marteze un anter doussen en overn, a c'hoas ak hên a ves an dra-ze e kals parrezio-uzo? Hoguen ac'hano bete'n nos pet a zounjo zo quen digueri dor an Ilis! a beza gouskoude en darn vuya eus ar parrezioù kement all a dies e kichen an Ilis! ak ar re a zo el leac'h all o choum a elfe ive dont, a meur a veach er zizhun zo ken, da dy an Autrou Doue, ma ve hi o deffe c'hoant. Kivridiou a ves da ober, bes o devez da zont da vourk ho farres; pa vezont deuet nak a amzer a ouzont da gaout evit kaozeal a marteze dispen ho nessa; hoguen mont d'an Ilis, neuze ne dizeur mui; e meur oc'h ho despaill er gueur!

A chetu aze ar pes a c'hounid Hor Salver o choum nos a deis en hon

toues! evel pa non deffe klevet biskoas ema er Sakramant eus an Auter, ar memes tra! Alies e klevour ac'hanoomp o lavaret eo *mad an Autrou Doue*; ya mad eo, a bet e renk beza pa c'houzaon kement-all. Ma vije hunan bennak ac'hanoomp-ny en he blass, mil bell zo oa koezet an tan var ur c'hals a barrezioù!

Meur a amzer-zo, siouas! ma ema ar yenien-ze e toues ar gristenien, petra bennak biskoas n'oat bet evel hirio, kals a vank! — Var dro ar bloas 1540 un nebeud eneoù mad eus a Roum gat ar boan o doa o velet peguen nebeud a dud a yea dirak ar Sakramant a en hem ententas evit ma vije atau e daou benn an deis hunan bennak da viana anezho o pidi dirak aoter ar Sakramant. Ar pes a reant a oue kavet kaer ak abars c'hoec'h mis goude Ilizou Roum n'oant mui envel oc'h kent. An tadou Santel ar Pabet a roas Induljansou bras gat ar c'hoant o doa e teujet e kement korn zo er bed da ober evel a rea an eneoù mad-ze; a chetu hi ama,

an Induljansou a zo roet da guement
a yelo e Breuries ar Sakramant :

INDULJANSOU PLENIER.

1° D'an deis ma zear er Vreuries a
boues koves, kommunia a pidi erves
intansionou Hor Mam Santel an Ilis.

2° D'ar goener tosta var lerc'h eis-
vetes ar Sakramant gat ma zear da
goves, da gommunia, a ma vezo pe-
det erves intansionou an Ilis. Mont a
dlear ive d'ar procession a rear en
deis-ze. Gouskoude an neb ne elfe
ket mont a c'hounezo an Induljansou
o koves, o kommunia ak o pidi erves
intansionou an Ilis. Ar goener-ze eo
an hini en hem gav hirio epad eisve-
tes ar Sacramant abaoue ne rear muy
ar gouel d'he zeis.

3° En artikl ar maro, a boues koves,
kommunia a lavaret a galoun ma
n'oar evit he ober a c'hinou an hano
Santel a Jesus.

INDULJANSOU DISTEROC'H.

1° Seis vloas a taloudegues seis ko-
rais : 4° Da zeis gouel ar Sakramant a

boues koves, kommunia a pidi erves
intansionou an Ilis ; 2° Beb trede sul
eus ar mis a d'ar Yaou Amblit, a boues
koves, kommunia a mont d'ar pro-
cession a rear en deiziou-ze ; 3° Be-
vech ma zear var lerc'h an Autrou
Doue pa gasseur aneza d'ar re glan.

4° Kant derves d'ar Yaou Amblit a
boues mont da bidi d'al leac'h ma la-
kear an Autrou Doue ; 2° Bevech ma
zear var lerc'h ur c'horf maro pa zou-
gueur aneza d'ar Vered ; 3° Bevech ma
kleveur an Overn en un Ilis pe japel
e pehini ema ar Vreuries, ma lojeur
ur paour, ma poanieur da lakat ar
peoc'h e toues ar re zo yenien entre-
zo, ma levereur ur Bater ak un Ave
pa gleveur seni evit kass ar gomu-
nion d'ar re glàn ma n'oar ket an hu-
nan evit mont var lerc'h an Autrou
Doue, ma levereur pemp Pater a pemp
Ave evit an Anaoun ; 4° Bevech ma
poanieur da zigass var an hænt mad
ar re a yoa faziet, ma teskeur ho c'hre-
ansou d'ar re ne ouzont ket anezho,
ma zear da ur procession ; 5° Bevech
ma zear da velet ar re glàn, ar re zo

er prizoun, pe ma rear ur vad ben-nak d'an nessa.

Ak an oll Induljansou-ma a elleur da c'hounid evit an Anaoun.

Evit beza eus a Vreuries ar Sakramant eo ret rei an hano d'ar belek zo e penn ar Vreuries. Hoguen evit gounid an Induljansou eus un dra c'hoas da ober, evel lavaret ur beden ben-nak, tremen beb sizhun pe bep mis kemema-kemema a amzer en Ilis etc... An dra-ze a dle beza merket var ar paper a oue sinet gat an Autrou'n Escop pe gat hon Tad Santel ar Pab pa oue lakeat ar Vreuries er barres m'oc'h eus roet oc'h hano. Goella a ouffac'h eta da ober eo goulén digat Autrou persoun ar barres-ze petra zo da ober Hén pe an neb en deus goulennet ar Vreuries en deus lavaret petra yoa souch da ober er barres.

Daoust peur gouskoude e c'hoes-simp-ny koumpren eo er gommunion ema hor bues, ak eo abaoe m'oar yeneat e kenver ar Sakramant eus an Auter eo e veleur ar bed o vont var he guement all ! Goassoc'h goas e

zaimp c'hoas ma na gueromp diqual. Goelit eta ur foennok ak a zo dizroet an dour divarnizhi; kentoc'h oa un dudi he goelet, iviziken e doare pa ve bet an tan o suilla kement zo enni. An dra-ze a c'hoarvezo ganeomp ive mar kendalc'homp da veza e kenver ar Sakramant eus an Auter ar pezm'oump bet betek-enn, ur c'hals da viana ac'hanomp. An Autrou Doue a skouizo oc'h her goelet a leac'h aoualac'h en deus da ober.





BREURIES AR GALON ZAKR A JESUS.

Eus ar galoun eo e teu kement zo a fall en oberou an den, eme'n Aviel; ac'hano e teu ar muntrou, an oultria-chou, etc....., eno eo e tiouanont da guenta. Eus ar galon eo e teu ive kement a reomp a vad. Nak eta ar pes en deuz great ak a ra bemdis an Autrou Doue evidomp ken entrezomp, eus a be leac'h e tle dont nemet eus a galoun Hor Salver Jesus-Krist? O kaloun va Jesus, kel leun a drugares ak a garant es evit an den, peur em bezo-me ho meulet ak ho trugare-keat ec'heist ma koessie dign ober?

Ya, ac'hano e teu ar c'hor burzudus-ze en deus digasset ar vues ak ar yec'het e kement all a eneo a n'oant betek neuse nemet evel traou sounnet; e kaloun Jesus ema an eyenen eus an oll c'harrassou a zo koezet bis-koas var an douar evel ur glao ak a

lakea kement a yoa da ziousan a da zével; kaloun Jesus eo a yoa var menes Kalvar o paea d'an Tad eternal kement a renket evit pec'hijou an dud; eus ar feunteun-ze eo deuet an oll zikouriou kaer-ze on deus bet hon hunan abaoe ma zeus ac'hanomp. A gouskoude pe leac'h ema ar re a brij zo ken sounjal e kaloun Hor Salver?

Nos a deis ne ddivije beza ken o rodella en hor penn nemet ar zouch eus ar pes en deus great ak a ra bemdis ar galoun zakr a Jesus evidomp; etreuzek ar galoun divin-ze e koessie d'hon daoulagat beza atao o para; goelit eta ur c'haro ak a zo dare gat ar sec'het; nak a c'halop a zo gatha ec'heist ma sant eus un tu a dost un eyenen e pehini e kavo peadra da derri he zec'het! Chetu ive penaus e koessie deomp beza gat kaloun Hor Salver; e peb leac'h all e koessie deomp skouiza; a ne ddivijemp beza en hon eus nemet e kichenik ar feunteun eus a galoun an Autrou Doue, ak ar c'hontrol beo eo a c'hoare. Pa ellomp beza gat traou ar bed, nak hen

a ya neuze an Amzer buan var dro !
ak a veac'h on devezo tizet en hem
gaout e kichen kaloun Jesus na doup
inouet-marô, e doare pa ve kant vloas
abaoue ma emoump eno ! na petr'eo
eta an den !

Er bloas 1674, un deis m'edo ul
leanes santel anvet Marc'harit Mari
Alakok o pidi an Autrou Doue e velas
Hor Salver dirazhi. Trist oa evel ar
maro ; en em glemm a rea ispicial
eus an nebeud a zouch a doa an
dud eus he galoun goude kement all
evel en doa great evitho ak e fidi a
reas da gaout hi da vihana , keit a
ma vije var an douar, ar muya ma
elje a joa oc'h he Galoun Zakr.

Al leanes santel a oue mall gathi
kounta d'he c'hoarezet ar pes e doa
goelet ak ar pes a yoa bet lavaret di-
zhi gat Hor Salver. Hogueu goelit pe-
guen dies eo an den da loc'had ! Epad
meur a vloas ne oue nemet un ne-
beudik ak a brijas he selaou ; ur bur-
zud a renkas an Autrou Doue da ober
evit lakat an dud da zigueri ho daou-
lagat.

Er bloas 1720, e tiollas ur c'hlen-
ved er gueur a Varseill evel n'oa bis-
koas goelet he zeurt. E douk mis goen-
golo a mis here oue kement a vervent
m'oa beac'h o kaout tud da zouguen
ar c'horvou marô d'ar vered. A gant-
chou e veze an enterramanchou bem-
dis. An deis kenta a vis du, pa edo ar
c'hlenvet goassa en he egar, an Au-
trou Belzuns a yoa neuze Eskob e Mar-
seill, a yeas e procession dre gueur,
ur gorden var dro d'he c'houzouk a
var he dreid noas ; kement a elle trei-
na a yoa var e lerc'h o respount oc'h
ar MISERERE MEI. Pa oue echu ar pro-
cession an Autrou'n Eskob a lavaras
an Overn, a da fin an Overn ec'h en
hem daolas var benn he zaoulin ak
he c'hoestlas he oll Eskopti d'ar Ga-
loun Zakr a Jesus ; a veac'h oa echuet
da barlant na eanas ar c'hlenved evel
pa vijet bet o teuleur dour en tan !

Goude ur seurt burzud Breuriez ar
Galoun Zakr a Jesus a oue prestik ana-
vezet dre bevar c'horn ar bed ; Hon
Tadou Santel ar Pabet a roas ive In-
duljansou ar re gaera evit kement hini

a yelo er Vreuries santel-ze, a ne ket soues pe guir ur beden great gat aleis var un dro a ra kals muy a blijadur d'an Autrou Doue eguet ar pes a ouf-semp da ober en hor part hon hunan ; ar Speret Santel he hunan en deus he lavaret deomp.

INDULJANSOU PLENIER.

1° D'an deis ma zear er Vreuries a boues koves, kommunia a pidi erves intansion Hon Tad Santel ar Pab ;

2° Da zeis Gouel ar Galoun Zakr pe ar Sul var lerc'h a boues koves kommunia, etc.... ;

3° Beb goeneur pe beb Sul kenta eus ar mis, ur vech er mis d'an deis a guereur a boues koves, etc.... ;

4° En heur ar maro a boues lavaret a galoun an Hano Santel a Jesus ma n'oar evit he lavaret a c'hinou.

INDULJANSOU DISTEROC'H.

1° Seis vloas a taloudegues seis Korais da beb hini eus ar pevar Sul zo araok Gouel ar Galoun Zakr, a boues Sakramanti ;

2° Tri-uguent derves evit kement a rear dre joa evit Doue.

Evid gounid an Induljansou-ma e renkeur lavaret bemdis ur Bater, un Ave, ur Gredo, gat ar bedennik-ma :

O Kaloun douss a Jesus grit ma ho karign bemdis muyoc'h-vui.

Induljansou all evit ar re zo e Breuries ar Galoun Zakr ak a elleur da c'hounid eb lavaret ar Bater, an Ave nak ar Credo-ze.

INDULJANSOU PLENIER.

1° D'an deis a guereur bes mis a boues lavaret bemdis dioc'h ar mintin, da greis-deis, a d'ar pardaes tri *Gloria Patri* evit trugarekat an Autrou Doue eus ar grassou kaer en deus roet d'an Itron Varia, ouспен ar c'hant derves a c'hounezeur bevech ma levereur ar *Gloria Patri* ;

2° Da C'houeliou'r Verc'hes e Kerzu, Goengolo a Meurs, da C'houel ar Chandelour, da Anter-Eost. da C'houel an Oll Zent, da anter Gouel an Anaoun, da C'houel Per, da C'houel Sant Jo-

seph, da C'houel Sant Yan Avieleur, da C'houel Sant Gregor d'an daouzekvet a vis Meurs, da beb hini eus ar c'hoec'h goeneur pe c'hoec'h Sul zo araok Gouel ar Galoun Zakr.

Evit an Induljansou-ma e renkeur koves, kommunia, pidi erves intansionou Hon Tad Santel ar Pab, a mont da bidi da japel ar Vreuries, pe ma n'oar ket evit mont goulén digat ar c'honfessour un dra bennak e leac'h an dra-ze. Ne ket ret gouskoude goulén beveh, ak aoualac'h eo en deffe ar c'honfessour lavaret ur vech : pa ne vlot ket evit mont da japel ar Vreuries, chetu ama petr'o pezo da ober el leac'h an dra-ze.

INDULJANSOU DISTEROC'H.

Evit ho gounid e renkeur ive mont da bidi da japel ar Vreuries pe ober ar pezo zo lavaret gat ar c'honfessour.

1° Seis vloas a taloudegues seis Korais evit ar re a rai un navet araok Gouel ar Galoun Zakr ak an Induljansou-ma a c'hounessint bemdis epad an navet;

2° Kement all da oll Goeliou'r Ver-c'hes a da re an ebestel;

3° An oll Induljansou a c'hounezour o vont da bidi da Ilizou Roum, ak a gaveur an daolen anezho var lerc'h Breuries ar Skapular.

Evit gounid an Induljansou zo e Breuries ar Galoun Zakr eo ret beza roet an hano evit mont er Vreuries, pidi erves intansion Hon Tad Santel ar Pab, ak ober ar pezo zo merket aze araok.

An oll Induljansou-ma a elleur da c'hounid evit an Anaoun.





BREURIES AR FEIS.

Nak a zo c'hoas a vroyou dre ar bed a ne ket anavezet an Autrou Doue ennho; e re all ne felleur ket he he-nori evel m'en deus he hunan lavaret ober, evel e Bro-Zaos! a lezet e vezo ar re zo o choum er broyou-ze da vont a bez ak en doare ma emint d'an tan eternal? *Rak eb ar Feis n'oar ket evit plijoud da Zoue.* Pa zigoes gane-oc'h goelet tud eus ho pro oc'h ober ar pennou fall eb ma false dezho dont zo kenn ennho ho hunan en heur ar maro an dra-ze a deu d'oc'h eskلامي, a ne ket soues; petra ouffe beza tristoc'h eguet goelet un den oc'h en hem deuleur var he benn e kreis kaloun an ivern? hoguen ar re a zo o choum er broyou-ze a no deus hi ket peb a ene evel on deus-ny? Prenet int gat Hor Salver evelomp-ny; ar memes barados pe ar memes ivern zo evitho

kouls ak evidomp-ny; ak or be ar galoun da lezeur anezho da vont da goll eb klask da vihana rei ur sikour ben-nak dezho?

Goelet a rear bemdis beleyen yaou-ank o kuitaat ak ho c'herent ak ho bro evit mont da brezek an Aviel d'an dud gueis-ze. An dra-ze a gavit kaer a pa zigoes ganeoc'h klevet beb en amzer : *An autrou-m'an autrou en deus kollet e vues; evel e vestr, lazet eo bet gat ar re a falle deza da jacha eus a haent an ivern a da lakat var hini ar barados*, e klevetur ac'hanoc'h o lavaret : *ma n'ema ket ar seurt-ze e barados an Autrou Doue, piou a yelo eta ebars?*

Petra vir ouzoc'h da ober evel ar veleyen-ze pa gavit ker kaer ar pezh a reont? Da vihana pedit an Autrou Doue da skuill he vennos varnezhio a sikourit oc'h ar mizou; ak ar pezh a c'houlennour diganeomp a zo kennebeud all a dra! ur goennek beb sizhun digat peb hini! sur neus eno peadra da rivina den.

Gouskoude ouспен ar pers o pe er

boan a guemer ar Vissioneurien ak er vad a reont chetu ama an Induljansou a ro Hor Mam Santel an Ilis da guement a yelo e Breuries ar Feis.

1° Induljansou plenier d'an trede a Vis Mae a da C'houel Sant Frances Xavier a zo d'an trede a Vis Kerzu, pe d'an hini a guereur eus an eis derves zo var lerc'h an daou c'houel-ma, a boues koves, kommunia, mont da bidi erves intansion Hon Tad Santel ar Pab d'an Ilis barres ma neus a dost Chapel ebet evit ar Vreuries a lavaret bemdis ur Bater, un Ave gat ar c'houmziou-ma : *Sant Frances Xavier, pedit evidomp.*

Ma n'oar ket evit mont da bidi d'an Ilis barres e elleur goulén digat ar c'honfessour un dra all e leac'h an dra-ze.

Ma c'hoarfe ne ve ket guellet ober ar goueliou-ma d'ho deis e c'houne-zeur an Induljansou plenier d'an deis mac'h en hem gavint divezatoc'h.

An neb a rai un navet araok pep hini eus an daou c'houel-ma a c'hou-nezo ouспен tri c'hant derves Indul-

jansou bemdis epad an navet ak an navet-ma a elleur da ober er part an hunan m'ar kaver dies mont d'he ober gat ar re all ;

2° Mar grear var ar bloas ur servich evit ar re a zo maro eus ar Vreuries e zeus Induljansou plenier evit an oll vreudeur a c'hoarezet a dui d'ar servich, a boues koves, kommunia, etc. ;

3° Induljansou plenier diou veach er mis d'an deiziou a guereur a boues koves, kommunia, pidi erves intansion an Ilis a lavaret bemdis ur Bater, etc..... evel on deus lavaret aze diaraok ;

4° Da C'houel ar Verc'hes e Meurs a da Anter-Eost a boues koves, etc. ;

5° Induljansou plenier en heur ar maro a boues kaout ur guir c'hlaç'har d'ar pec'hijou, a lavaret a Galoun an Hano Santel a Jesus ma n'oar evit he lavaret a c'hinou.

INDULJANSOU DISTEROC'H.

1° Kant derves beveh ma levereur pedennou ar Vreuries ;

2^o Kement all bevech ma roeur ar goennek.

An neb ne ket evit rei ur goennek beb sizhun, ker paour eo, a c'hounezo Induljansou ar Vreuries o rei ar pes a ell.

Evit beza eus ar Vreuries a kaout pers en Induljansou e renkeur lavaret bemdis ur Bater, un Ave gat ar c'houlmziou-ma : *Sant Frances Xavier, pedit evidomp*, a c'hoas ar Bater ak an Ave Maria eus ar pedennou dioc'h ar mintin zo aoualac'h, a rei beb sizhun ur goennek. Ar vugale ne deus ket great ho Fask kenta a ell gounid oll Induljansou ar Vreuries oc'h ober ar pes en devezo lavaret ho c'honfessour dezho e leac'h ar gommunion.

An oll Induljansou-ma a ell beza gounezet evit an Anaoun.



BREURIES AR ROZERA.

Bez e zeus ak a gaf dezho e teu ar Rozera eus a amzer brezelioù kenta an douar Santel. Betek neuze ur c'hals a gristenien a lavare bemdis oll Zalmou ar Roue David ak e zeus kant anter kant anezho, ak evel epad ar brezel an anter eus an amzer ne dizet ket lavaret ar c'hant anter-kant salm-ze e oue lavaret un Ave Maria evit peb salm; lavaret oue ouspen pemzek Pater, hunan evit peb hini eus ar pemzek Kantik a io e pedennou an Ilis, a peb Pater a oue lakeat araok dek Ave Maria evit ma vije goelloc'h souch eus ar pezh a c'houlenn an Autrou Doue diganeomp dre e zek gourc'hemen. Ar beden-ma gouskoude n'oue nemeur anavezet en hor bro araok amzer Sant Dominik.

Ar zant-ma mantret o velet ar pe-c'hijou a reat ispicial er c'hres-deis

eus a Frans, eb ma eljet zo ken dont a benn da lakat den da zont enna he hunan, ne eane pell a yoa da bidi ar Verc'hes da ziski deza pe'n hant en hem guemeret evit digueri ho daoulagat da guement all a bec'heurien. Un deis var dro ar bloas 1206, epad m'edo var benn e zaoulin dirak Auter ar Verc'hes, an Itron Varia en hem ziskoezas diraza ak a lavaras deza n'en doa nemet lavaret ar Rozera a lakat ive ar muya ma elje a dud d'he lavaret. Sant Dominik a zao rak-tal en he za; en hem lakat a ra da brezek ar Rozera evel a yoa lavaret deza. Iviziken e doare ne ve ket ar memes tud a ve er vro, ne dec'heur muy dioutha, ne laoskeur muy a valloziou var he guein; er c'hountrol, dre ma za e ve lavaret e ve un dra o chacha an dud da zont d'he gaout. Ne bign ket ur vech er gador na ziroll al leon ak ar c'hri-fors : *O va Doue gouskoude*, a lavaret a boues penn, *nak e petra e sounjemp-ny eta? A leac'h on deus-ny c'hoas da c'hedal trugares goude kement all a bec'hjou?*

Ar Rozera a oue prestik anavezet dre bevar c'horn ar bed, ak a heb amzer en deus diskoezet an Autrou Doue dre ar burzudou ar re gaera peguement e plijar beden-ma dezha. Evit ma elje plijoud c'hoas muyoc'h da Galoun an Autrou Doue Sant Dominik a reas ur Vreuries evit ar Rozera, a chetu ama an Induljansou o deus roet Hon Tadou Santel ar Pabet da guement a yelo er Vreuries-ze.

INDULJANSOU PLENIER.

1^o D'an deis ma zear er Vreuries a boues koves, kommunia a pidi erves intansion Hon Tad Santel ar Pab; lavaret a dlear ive da nebeuta ur Cha-pelet. Ar gommunion a dlear da ober en Ilis ma ema ar Vreuries. Ma n'oar ket evit mont da gommunia en deis m'eo roet an hano e elleur gounid an Induljansou d'ar sul varlerc'h pe d'ar gouel tosta;

2^o Da C'houel Pask, d'ar Yaou-Bask, d'ar Pantekost, da C'houel ar Sakramant, da zeis Nedelek, da C'houel Sant Patrom ar barres, d'an trede

Sul a vis Ebrel, d'ar Sul var Ierc'h Gouel ar Verc'hes e Goengolo, a boues koves; kommunia a mont un tachad da bidi dirak Auter ar Rozera;

3^o Beb Sul kenta eus ar mis a boues koves, kommunia a pidi erves intan-sion an Ilis. Ar gommunion a dlear da ober en Ilis ma ema ar Vreuries, a mar kommuniour en un Ilis all e renkeur da vihana mont en deiziou-ze da bidi da Ilis ar Vreuries, pe'tra-mant d'ar procession;

4^o Da oll Goueliou'r Verc'hes, d'an deis mac'h henoreur hunan bennak eus a visteriou ar Rozera, a boues koves, kommunia a mont da bidi da Ilis ar Vreuries;

5^o En heur ar maro a boues koves a kommunia; a ma n'oar evit ober nak an eil nak eguile kaout da vihana ur guir c'hlac'har d'ar pec'hijou, a lavaret a galoun ma ne elleur hen ober a c'hinou an hano Santel a Jesus;

6^o Ar plac'het, ar mevellou a ke-ment zo dindan re all a nint ket evit mont d'ar procession a ves great d'ar

sul kenta eus ar mis a c'hounezo evel atau an Indulgansou plenier a boues ma lavarrint da nebeuta ur Chapelet a ma vessint e souch mad da vont da zakramanti kenta ma ellint. Ne c'houlenneur ket kennebeud digat ar seurt tud ze ma zaent da bidi da Ilis ar Vreuries pa rear ar gouel eus a hunan bennak eus a Visteriou ar Rozera, ak a boues ober ar pes a c'houlenneur ouспен, a lavaret ar Chapelet e ellont gounid an Indulgansou plenier;

7^o Aoter ar Rozera e deus an oll Indulgansou a lakear oc'h an Aoteriou, bevech ma tui ur belek ak a zo e Breuries ar Rozera da lavaret an overn outhi evit hunan maro ak a yoa er Vreuries epad he vues;

8^o A pa ne vet ket eus a Vreuries ar Rozera e elleur gounid : 1^o Indulgansou plenier da C'houel Pask, d'ar Pantekost, d'an Dreindet, da C'houel ar Sakramant, beb Sul epad ar C'horais, d'ar Sul kenta a vis Here, da C'houel Sant Dominik, da C'houeliou Sant Thomas d'Aquin, Sant Vissant Ferrier, Santes Gatell a Sienn, a da

C'houel kement Sant a Santes zo eus a urs Sant Dominik, a boues koves, kommunia a mont da bidirak Aoter ar Rozera; 2^o Seis vloas a taloudegues seis Korais o vont d'ar procession a ves great d'ar Sul kenta eus ar mis; pemp bloas a taloudegues pemp Korais o lavaret pemp dizenes pe ar Chapelet. A m'ar guell an oll gounid an Indulgansou-ma eo sklear ar re a zo e breuries ar Rozera a ell ho gounid ive.

INDULJANSOU DISTEROC'H.

1^o Kant derves a boues choum da glevet kana ar Salve Regina pa ves kanet goude koublejou dirak Aoter ar Vreuries;

2^o Kant derves bevech ma zear da bedirak Aoter ar Vreuries;

3^o Tri c'hant derves bevech ma zear da velet ar re glan pe var lerc'h ur c'horf maro pa gasseur anezha d'ar vered;

4^o Tri bloas a taloudegues tri C'horais bevech ma zear da velet ar re zo eus ar Vreuries pa vezont klân pe d'ho enterramant pa vezont maro;

5^o Pemp bloas a taloudegues pemp Korais o lavaret an hano Santel a Jesus varlerc'h an Ave Maria;

6^o Tri-ugent derves evit kement a rear dre joa evit Doue pe evit an nessa;

7^o An oll Indulgansou a c'hounezeur o vont da Ilizou Roum ak a vezo kavet an daolen anezho var lerc'h Breuries ar Skapular, a boues mont en deiziou-ze da bidirak pemp Aoter Ilis ar Rozera, petr'amant pemp goech dirak ar memes Aoter ma neus ket a bemp en Ilis.

An oll Indulgansou-ma a elleur da c'hounid evit an Anaoun.


Hon Tad Santel ar Pab Pi VII en deus roet Indulgansou plenier evit kement hini, a pa ne ve ket eus ar Vreuries, a guemero un deis ak un heur var ar bloas evit lavaret ur Rozera a bemzek dizenes gat ma zai en deis-ze da goves a da kommunia a ma sounjo goella guello e Mysteriou'r Rozera.

Ar re zo e Breuries ar Rozera a rae mad kommunia heb meurs epad pemp-

zek sizhun en henor da Zant Dominik. Kant derves Induljansou a e'hounes-sint beveach ma raint, ak Induljansou plenier d'an hini a garrint eus ar pemzek meurs-ze a boues ma raint ar pes a c'houlennour peurvuya evit an Induljansou plenier.

Evit gounid an Induljansou eus a Vreuries ar Rozera e renkeur :

1^o Beza roet an hano ; 2^o Lavaret ur Rozera a bez beb sizhun ; hoguen, eme Hon Tad Santel ar Pab Pi IX an 31 a vis gouere 1858, a bennadou e elleur he lavaret a zo ken ne ket ret beza var benn an daoulin ; 3^o Ober ar pes zo merket evit peb hini eus an Induljansou.



SKAPULAR.

D'ar c'hoezek a vis gouere 1265, e varvas e Bourdel ur mignoun bras d'an Autrou Doue hanvet Simon Stok. Guinidic oa eus a vro zaos ak abaoue meur a vloas oa manac'h en urz Karmes.

E 1254, d'ar c'hoezek ive a vis gouere, epad m'edo evel m'oa boas o pidi dirak Aoter ar Verc'hes e velas an Itron Varia diraza. Ur Skapular a yoa gathi en he dourn ak e lavaras deza : *C'hoant bras am beus e teue ar Breudeur ak ar c'hoarezet eus a urz Karmes da guemeret ar Skapularma ; ar re her grai a rai kals plijadur dign, ho c'hemeret a rign ive d'am sro evit va bugale, ak an neb en devezo ur Skapular varneza en ur vervel ne dai ket d'an tan eternal. Goude ar c'hounziou-ma an den santel ne ve-*

las muy ar Verc'hes, hoguen eb m'en divije goezet netra, ar Skapular a yoa lakeat deza en he zourn.

Anter kant vloas goude Hon Tad Santel ar Pab Yan XXII a velas ar memes tra. An Itron Varia en hem ziskoezas deza un derves en ur lavaret : *Gat a reot o pezet souch eus ar re zo en urz Karmes, ar re-ze eo ispicial va bugale, a ma tigoes gatho rankout mont d'ar purkator goude ho maro, bezit sur ne joumign ket eb kaout trues outho, ho sikour a rign kement a ma ellign, evit tenna anezho er meas, ispicial d'ar sadorn var lerc'h ho maro.*

Kement all a vurzudou a zo c'hoarvezet ed ar veach abaoue, pa veze ar re a zougue ar Skapular en un izom bras bennak, a ziskoes sklear eo guir ar pez o doa goelet an daou zen santel-ma ak ema kement zo e Breuries ar Skapular dindan diouaskel an Itron Varia; a ne ket ebken pa vezont er purkator e teu ar vam vad-ze d'ho sikour, ama zo ken ne ket he c'halon evit ankonoc'hat anezho.

Evelse ive Hon Tadou Santel ar Pab o deus roet Induljansou bras da guement a yelo en ur Vreuries ak a blij kement d'ar Verc'hes.

INDULJANSOU PLENIER.

1^o D'an deis ma zear er Vreuries a boues koves, kommunia a pidi erves intansion Hon Tad Santel ar Pab;

2^o Da C'houel Itron Varia Garmes pe d'an deis a guereur epad an eisevetes, a boues koves, kommunia a pidi erves intansion an Ilis;

3^o En heur ar maro a boues lavaret a galoun ma n'oar evit hen ober a c'hinou an hano Santel a Jesus;

4^o Induljansou plenier a boues mont d'ar procession a rear ur veach er mis, a beza bet o koves ak o kommunia.

Ar re ne vent ket evit mont d'ar procession abalamour ma int klân, mac'hâgnet, kouls ak ar re a zo var ar mor petramant oc'h ober hænt a c'hounezo an Induljansou evel atau a boues ma zaint da bidi dirak Auster ar Vreuries, a ma nint ket c'hoas

evit ober an dra-ze ne c'houlenneur digatho nemet ma lavarrent anter kant Pater ak anter kant Ave Maria gat ur guir c'hlaç'har d'ho fec'hijou a ma vent e sounch mad da vont da Zakramanti kenta ma ellint.

5° Induljansou plenier da C'houel ar Verc'hes e Kerzu, d'an eis a Vengolo, d'an unan var'n ugent a vis Du, d'ar pempet var'n ugent a Veurs, d'an eil a C'houere, d'an eil a vis C'hoevreur a da Anter-Eost a boues koves, kommunia a mont da bidi da hunan eus a Ilizou Karmes erves intansion an Ilis;

6° Ar memes Induljansou da C'houel Sant Joseph, da C'houeliou Sant Simon Stok, Santes Anna, Sant Mikeal, a boues koves, kommunia a mont da bidi da hunan eus a Ilizou Karmes erves intansion Hon Tad Santel ar Pab. Gouel Sant Simon Stok zo d'ar c'hoezekvet a Vae.

INDULJANSOU DISTEROC'H.

4° Pemp bloas a taloudegues pemp Korais evit ar re a dosta oc'h ar gom-

munion ur vech er mis o kaout ar Skapular varnezho, a boues ma petint erves intansion an Ilis;

2° Tri bloas a taloudegues tri C'horais da C'houeliou'r Verc'hes a boues ober ar memes tra;

3° Pemp bloas a taloudegues pemp Korais bevech ma zear var lerc'h ar Sakramant pa gasseur an Autrou Doue d'ar re glân en ur ober ur beden ben-nac evitho;

4° Tri c'hant derves evit ar re a rai vijil da Verc'heur a da Zadorn;

5° Daouguent derves bemdis a boues lavaret seis Pater a seis Ave Maria en henor d'ar Verc'hes;

6° Kant derves bevech ma zear var lerc'h ur c'horf maro pa gasseur anezha d'ar vered;

7° Kant derves o lavaret goella guel-leur Ovis bihan ar Verc'hes;

8° Kant derves bevech ma zear d'an Overn, ma roeur an aluzen, a ma rear un dra bennak dre joa pe dre drues oc'h an nessa.

An oll Induljansou-ma a elleur da c'hounid evit an Anaoun.

Evit gounid an Induljansou zo er Vreuries eo ret kaout ur Skapular beniziet gat ur belek ak en doa-ar c'halloud da venizien Skapularou. Goude beza he veniziet ar belek a dle he lakat var dro gouzok an neb zo o c'houlén mont er Vreuries. Ret eo ive lakat eves da gaout atañ ar Skapular varnomp e kement a ma vezo posubl. Kentoc'h e ranket c'hoas beza roet an hano evit gounid an Induljansou, hoguen Hon Tad Santel ar Pab Gregor XVI en deus lavaret ne ket ret an dra-ze; mad a raet gouskoude rei an hano pa ves c'hoant da vont er Vreuries.

Neus merket peden ebet evit Breuries ar Skapular. Ar c'hiz zo gouskoude da lavaret bemdis ur beden bennak, evel seis Pater a seis Ave gat ar Gloria Patri, etc.... Ar pezh zo ret eo kaout atañ ar Skapular varnomp, ak e gaout a renkeur en noz kouls ak en deis.

Pa c'houlennour evit an Induljansou plenier ma zaet da bidi da Iliziu Karmes e elleur ober ar pezh a vezo

lavaret gat ar c'honfessour e leac'h an dra-ze ma neus a dost Ilis ebet evit menec'h pe leanezet Karmes.

Ar Skapular a renk beza great gat daou damik mezer. Ar mezer-ze a dle beza e gloan, ak he liou a renk beza brun, du pe o tenna var an du. Al lassou a ell beza e neud lin ak eus al liou a guereur. Neus drouk ebet ak e staket un imaj bennak oc'h ar Skapular.

Ma kolfet ar Skapular e elleur an hunan kemeret un all eb ma ve ret e ve beniziet. Ar memes tra ma choumsfet pell eb he zouguen, a pa ve zo ken dre fae, neus ken da ober evit gounid adarre an Induljansou nemet kemeret ar Skapular ak ober iviziken ar pezh zo merket. Neuse gouskoude e ve surroc'h lakat he vinizien.

He zouguen a renkeur evel ma laka menec'h a leanezet Karmes ho Skapular. Hunan eus an daou dam mezer a dle beza var ar chouk ak eguille araok var ar galoun. Bez e zeus ak a laka anezho ho daou dioc'h ar memes tu, an eil harp oc'h eguille; neus In-

duljansou ebet evit ar re a ra an dra-
ze, kennebeud nak evit ar re a laka
ho Skapular e doare ar gouriz o doa
kent ar zoudardet evit derc'hel ho
c'hleze.



INDULJANSOU a c'hounezeur o vont da bidi
da Iliziu Roum evel ma zeo merket en
huriou a ves gat ar belek o lavaret an
Overn, ak a elleur ive da c'hounid e
Breuries ar Galoun Zakr, en hini ar
Rozera, ak e Breuries ar maro mad.

1^o D'an deis kenta eus ar bloas, In-
duljansou a dregont vloas a taloudegues
tregont Korais ;

2^o Da C'houel ar Rouanes tregont vloas
a taloudegues tregont korais ;

3^o Kement all da Zul al lard a da heb
hini eus an daou Zul araok ;

4^o Pemzek vloas a taloudegues pemzek
Korais da Verc'heur al Ludu a d'ar pe-
vare Sul eus ar C'horais ;

5^o Pemp bloas var'n-uguent a talou-
degues pemp Korais var'n-uguent da Zul
Bleuniqu ;

6^o Induljansou plenier d'ar Yaou Am-
blit a boues koves a kommunia ;

7^o Da Vener ar Groas a da Zadorn Fask
tregont vloas a taloudegues tregont Ko-
rais ;

8^o D'an oll deiziou all eus ar C'horais
dek vloas a taloudegues dek Korais ;

9° Indulgansou plenier da Zul Fask a boues koves a kommunia ;

10° Bemdis epad eisvetes Pask a da Zul Fask vihan tregont vloas a taloudegues tregont Korais ;

11° Da C'houel Sant Mark tregont vloas a tregont Korais ;

12° D'ar C'horais bihan ar memes tra ;

13° D'ar Yaou Bask Indulgansou plenier a boues koves a kommunia ;

14° D'an deis araok ar Pantekost dek vloas a taloudegues dek Korais ;

15° Da Zul ar Pantekost a bemdis epad an eisvetes tregont vloas a taloudegues tregont Korais ;

16° Da gutuerou goengolo dek vloas a taloudegues dek Korais d'ar merc'heur, d'ar goeneur a d'ar sadorn ;

17° D'ar c'henta, d'an eil a d'ar pevare Sul eus an Azvent dek vloas a taloudegues dek Korais ;

18° D'an trede Sul eus an Azvent pemzek vloas a taloudegues pemzek Korais ;

19° Da gutuerou mis kerzu dek vloas a taloudegues dek Korais ;

20° D'an deis araok Nedelek, da Noz ar Pelguent, da Overn Goulou-deis pemzek vloas a taloudegues pemzek Korais ;

21° Da C'houel Nedelek Indulgansou


plenier a boues koves a kommunia ;

22° Da C'houel Sant Stevan tregont vloas a taloudegues tregont Korais ;

23° Da C'houel Sant Yan Avieleur, ar memes tra ;

24° Da C'houel an Inosantet, ar memes tra.

Ak an oll Indulgansou-ma a elleur da c'hounid evit an Anaoun.





BREURIES AR MARO MAD.

Un dra ak a goessie deomp da gaout atau, nos a deis, dirak hon daoulagat eo ar zouch eus ar maro. En hem gaout a rai gouskoude ganeomp, a mont a rankimp ac'hann pa dui hon tro, sounjemp enna pe ne reomp ket. Goelomp an eneou mad ed ar vech; lavaret a vije great n'oant evit beza en ho eas nemet var benn ho daoulin dirak ho arched. Nak hi a gave berr an amzer pa vezent eno !
Pa vez ul labour zies da ober, emezo, ne ket pa vezeur o vont d'he ober eo beza o koumans sounjal enna ; kentoc'h un tamik eo ret en hem guemeret mar deus souch d'he ober mad.

En tu ma koezo'r vezen e renko choum. Ar c'houmziou-ze a zo guir evidomp-ny kouls ak evit ar zent. Diouallomp eta ny ive, a mar d'oump fur en hem guemeromp abred. Hon

tud goechal o doa ur Vreuries evit goulén digat an Autrou Doue ar c'hass da gaout ur Maro mad. Bemdis e c'houlennent ar c'hass-ze digat Doue evit kement a ioa er Vreuries ; hoguen pa glevent e veze hunan bennak eus ar breudeur pe eus ar c'hoarezet en he amzer diveza, neuze ispicial e poanient da c'houlén evitha ar c'hass da veza e stad vad ak e mignounach an Autrou Doue en heur eus he dremen- van. Mont a reat d'he velet ; atau zo ken e veze hunan bennak eus ar Vreuries en he guichen ken en deveze tennet he alanad diveza, evit he zikour d'en hem zevel e treuzek an Autrou Doue, da veza leun a fizians en he vadeles ak en he drugares, a da gaout souch ne ket ama edo he vro nak he gueur, hoguen e kreis gloar ar barados ! Na ny a gaffe kaer m'or be un ene mad bennak ive en hor c'hic'hen evit hor sikour en heur eus hor maro ! A ma karrempe or be, mar marvomp da viana a glân-vele. Er Vreuries-ze ec'h henoret ispicial
Hor Salver astennet var ar groas, a

Kaloun an Itron Varia rannet gat ar c'hlac'har.

Chetu ama an Induljansou o deus roet Hon Tadou Santel ar Pabet da guement a yelo e Breuries ar maro mad.

INDULJANSOU PLENIER.

1^o D'an deis ma zear er Vreuries a boues kommunia ;

2^o En heur ar maro ;

3^o Da C'houeliou Nedelek, Pask, ar Yaou-Bask, da C'houel ar Rouanes, da C'houel ar Pantekost, da Zul an Dreindet, da C'houel ar Sakramant, da C'houeliou'r Verc'hes e Kerzu, Goengolo a Meurs, da C'houel ar Chandelour, da Anter-Eost, da C'houel Sant Joseph, da C'houel an Oll Zent a da C'houel peb hini eus an Daouzek Abostol, a boues kommunia en Ilis ar Vreuries pe, ma n'oar ket evit ober, en un Ilis all, a pidi erves intansion Hon Tad Santel ar Pab.

INDULJANSOU DISTEROC'H.

Ur bloas bevech ma zear varlerc'h ur c'horf maro pa gasseur aneza d'ar

vered ; bevech ma zear d'ar servich divin pe da zelaou kourmziou Doue, bevech ma zear d'an Overn var ar zizhun, ma rear an examin a goustians araok mont da gousket, ma zear da velet ar beorien glan, ar re a zo en hospital pe er prizoun.

An oll Induljansou a c'hounezeur o vont da bidi da Iliziou Roum a boues mont en deiziou zo merket en daolen zo varlerc'h Breuries ar Skapular da Ilis ar Vreuries pe d'an Ilis zo el leac'h ma emeur, a lavaret eno seis Pater a seis Ave Maria.

An hini a guemero un derves da nebeuta eus ar mis evit sounjal goella ma ello er maro en deus Induljansou plenier a boues koves, kommunia, mont da bidi da Ilis al leac'h m'oar bet o tremen an deis-ze ak ober ar pedennou a c'houlenn peurvuia Hon Tad Santel ar Pab.

An oll Induljansou-ma a elleur da c'hounid evit an Anaoun.

Evit beza eus ar Vreuries eo ret rei an hano ; poania a dlear ive da c'houlenn alies, bemdis m'ar guelleur, evit

kement zo er Vreuries, ar c'hraas da gaout ur maro mad; mont a dleat d'ho goelet pa vezont klàn ak ispecial pa vezont toc'hor evit ho sikour da gaout ur maro eürus.



BREURIES AN ANAOUN.

Kement zo a Induljansou el levrikma a elleur da c'hounid evit an Anaoun. Nak 'a vad eta a eljemp-ny da ober d'an eneoü eus ar purkator, ma karjemp!

An dra-ze gouskoude n'oa ket aoualac'h evit hon tud koz. Ne dajent ket ur veach d'an daoulin da bidi Doue, ne denjent ket ho sok da lavaret ho Angelus no divije souch eus an Anaoun. Ne reant zo ken peden ebet na vije atau varlerc'h pe un De profundis pe da viana ur Requiem æternam; hoguen, evel on deus lavaret kentoc'h desket o doa gat Hor Salver he hunan n'eus seurt ak a bliche d'an Autrou Doue evel ar pezh a-ves great gat aleis var un dro; kaloun an Autrou Doue ne ket evit herpel oc'h ur beden en doare-ze! Evelse ive evit

beza surroc'h da rei ur sikour ben-nak d'ar re zo e tan ar purkator e reant evel evit Breuries ar Sakramant, etc. . . En hem zistum a reant ar muya ma ellent e peb parres evit pidi evit an Anaoun, a peb hini eus ar breudeur ak eus ar c'hoarezet a dlle ober ar pes a veze merket gat Hon Tad Santel ar Pab evit ar Vreuries.

Eas eo gouzoud pebes plijadur a rea an dra-ze d'an Autrou Doue ! Ar vall en deus eo da elloud digueri he varados d'he vugale zo e kreis poaniou'r purkator; he justiss gouskoude a renk kaout ar pes a dlear dizhi; evelse ive nak a joa en deus pa vel ar re zo c'hoas var an douar o poania da baëa evit ar re n'int mui evit ober evitho ho hunan ! Ar garant-ze o doa hon tud koz evit an Anaoun ak ar boan a guemerent da glask sikour anezho oa douetus bras ar pes a yoa o tenna varnezho bennoziou ker kaer all evit ho sikour da guerzet ho hunan en hent ar b'arados evel a reant. Ar pes zo sur, el leac'h m'oar yeneat e kenver an Anaoun n'oar mui e do-

are kent. Neus mui, kals a vank ! na kement a feis na kement a zoujans Doue ; n'oun ket penaos emeur o klask ober vad evit ar re all ; re alies zo ken, siouas ! n'oar mui evit en hem ober, a ne gleveur menek nemet eus a ur goal asfer bennak.

E kals parrezioù ema c'hoas Breuries an Anaoun ; hoguen salo e vije kals stankoc'h ar Vreuries gaer-ze, a chetu ama an Induljansou o deus roet Hon Tadou Santel ar Pabet da guement a yelo ennlhi :

INDULJANSOU PLENIER.

1^o En deis ma zear er Vreuries a boues koves a kommunia;

2^o En heur ar maro a boues beza kovesseat a kommunit m'ar guellet ober, a lavaret a galoun ma n'oar evit he ober a c'hinou an Hano Santel a Jesus ;

3^o Da C'houel an Oll Zent, da Anter-Gouel an Anaoun, bemdis epad eisvetes an Anaoun, da bardoun ar Vreuries a zo da C'houel ar Verc'hes e

Goengolo, a boues koves, kommunia, mont un tachad da Ilis ar Vreuries, pidi erves intansion Hon Tad Santel ar Pab ak evit an Anaoun eus ar purkator ;

4^o Kement Aoter zo en Ilis ar Vreuries e deus Induljansou plenier a elleur da c'hounid evit an neb a leve-reur an Overn evitha, m'ar deo maro. El leac'h all e elleur goelet petre tle beza un Aoter evit ma ve lakeat Induljansou varnizhi.

INDULJANSOU DISTEROC'H.

1^o Kant derves o vont varlerc'h korf an neb zo maro eus ar Vreuries pa gasseur anezha d'ar vered : Lavaret a dlear an De profundis pe ar Chapelet ;

2^o Kant derves o lavaret an De profundis pe ar Chapelet pa gleveur eus maro hunan bennak a pa ne vije ket eus ar Vreuries ; kement all o vont varlerc'h an Autrou Doue pa gasseur anezha d'ar re glân ;

3^o Kant derves o lavaret an De profundis da lun pe da veneur evit an Anaoun. Kement-all beveach ma zear

da velet ar breudeur pe ar c'hoarezet pa vezont klân.

AR RE A ZO E BREURIES AN ANAOUN A BLE:

1^o Beza roet ho hano ; 2^o Tostaat alies oc'h ar Sakramanchou, bebb mis, m'ar guelleur ; poania da veva e pe oc'h gat ar re all, beza sentus e kerver ar re o deus da velet varnezho ; an dra-ze ouspen a c'hedeur digat kement zo en ur Vreuries bennak ; dezho ispicial eo rei skoer vad ; 3^o Da lun, da veneur, da zul a d'ar goueliou berz e tleont lavaret ur chapelet evit an Anaoun ; 4^o Pa vezo klevet eus maro unan bennak, m'ar doa eus ar Vreuries e vezo lavaret ur Chapelet, un De profundis gat ar Requiem æternam, etc., evitha ; ak un Ave Maria gat ar Requiem æternam ma n'o ket eus ar Vreuries ; 5^o Pa velo ar breudeur kass ur c'horf maro d'ar vered e livirint : *Autrou Jesus, o pet trues oc'h an ene-ma* a Requiem æternam, etc. ; 6^o Bebb bloas, ma n'int ket evit lakat ho hunan, ec'h en hem ententint gat

ar breudeur ak ar c'hoarezet evit lakat un Overn evit an Anaoun.

Nikun eus an traou-ma gouskoude ne deo indan boan a bec'het.



TREDE KEVREN.



Arabat eo deomp sounjal ne ve a Indulgansou nemet er Breuriezioù ; Nak a zo c'hoas a draou ak a elfe hor sikour, ma karrem, d'en hem zével varzu an Autrou Doue, evel ar groas, ur vetalen ak a zo varnizhi patrom ur mignoun da Zoue ak a ouzeur a zo e gloar ar barados, an Angelus, an De profundis a kement a bedennou all, etc. Ak on deus sounjet lavaret ive ur guer bennak divar benn ar re anezho o deus Indulgansou. En aoun gouskoude rak beza re hire raimpe evel evit ar Breuriezioù a ne barlantimp nemet eus ar re a zo anavezet muya en hor bro.

PEDENNOU EN HENOR D'AN DREINDET.

Sanctus, Sanctus, Sanctus Dominus Deus exercituum; plena est terra gloria tuâ. Gloria Patri, Gloria Filio, Gloria Spiritui Sancto.

Santel, Santel, Santel ouc'h, o Autrou, Doue an Armeoù; an douar zo leun eus ho kloar. Gloar d'an Tad, Gloar d'ar Mab, Gloar d'ar Speret Santel.

1^o Kant derves Induljansou ur vech bemdis evit kement a lavaro ar c'houlmziou-ma gat ur guir c'hla-c'har en ho c'haloun; beb Sul ed ar bloas, da C'houel an Dreindet a bemdis epad an eisvetes e elleur ho gounid teir goech.

2^o Induljansou plenier ur vech er mis a boues ho lavaret bemdis a mont da goves, da gommunia a da bidi da un Ilis bennak d'an deis meus c'hoant da c'hounid an Induljansou.

Kals pedennou zo Induljansou ur vech er mis oc'h ho lavaret; ne c'houlnezeur neuze an Induljansou nemet pa ves e guiriones lavaret ar pedennou-ze epad ar mis. Lakat eves a renkeur eta da veza e stad a c'hrass pa rear ar pez zo ret en deis diveza.

Gloria Patri, etc.

1^o Induljansou a dric'hant derves o lavaret ar Gloria Patri teir guech bemdis, dioc'h ar mintin, da gresdeis a d'ar pardaes; 2^o Kant derves ma ne levereur nemet ur vech;

3^o Induljansou plenier ur vech er mis evit kement hen lavaro teir goe-ach bemdis epad ar mis a boues koves a kommunia. Ar Gloria Patri a dler da lavaret evit trugarekat an Autrou Doue eus ar pes en deus great d'ar Verc'hes Vari, ak ispicial oc'h he diguemeret e glear an een goude he maro.

Navet en hénor d'an Dreindet.

Kement a rai en ho fart ho hunan pe gat re all un navet en hénor d'an Dreindet en deizioù araok Gouel an Dreindet pe d'ar mare a guirint eus ar bloas a c'houlnezo; 1^o Seis vloas a taloudegues seis Korais bemdis epad an navet; 2^o Induljansou plenier da fin an navet a boues koves, kommunia a pidi en un Ilis bennak erves intansion Hon Tad Santel ar Pab. Ar Pedennou a guereur a elleur da lavaret.

ACTOU A FEIS, A ESPERANS, AK A GARANTES.

1^o Seis vloas a taloudegues seis Korais beveach ma levereur an Aktou;

2^o Induljansou plenier ur veach er mis evit an neb ho lavaro bemdis a boues koves, kommunia a pidi evit Hor Mam Santel an Ilis ; 3^o Induljansou plenier en heur ar maro. Neus peden ebet ak a rae muy a blijadur d'an Autrou Doue eguet an Aktou a Feis, a Esperans ak a Garantes.

O va Jesus, trugares !

Kant derves beveach ma levereur ar bedennik-ze a greis ar galoun.

An haniou Santel a Jesus ak a Vari.

1^o Pemp derves var'n uguent beveach ma levereur a greis kaloun an haniou Santel a Jesus ak a Vari ; 2^o Induljansou plenier en heur ar maro evit ar re a vezo bet boas d'ho lavaret alies epad ho bues a boues ho lavaret a galoun ma ne ellont hen ober a c'hinou.

Jesus, Joseph, Mari me ro deoc'h va c'haloun a va ene,

Jesus, Joseph, Mari, bezit em c'henver pa vezign en va heur diveza ;

Jesus, Joseph a Mari, grit ma varvign-e peoc'h e tre ho tirec'h.

Tri c'hant derves beveach ma vezo lavaret an teir fedennik-ma o kaout er galoun ur guir c'hlaç'har d'ar pe-c'hijou ; kant derves ma ne levereur nemet hunan.

Meulet ra vezo Hon Autrou Jesus-Krist brema a da virviken ; evelen bezet great.

1^o Kant derves bevech ma levereur ar c'houmziou-ze pa en hem gaveur gat re all ak evit diskoes ec'h anavezour anezho. Hunan a lavaro : *meulet ra vezo Hon Autrou Jesus-Krist*, ak eguile : *brema a da virviken ; evelen bezet great* ; 2^o Induljansou plenier en heur ar maro evit kement a vezo bet boas da lavaret ar c'houmziou-ze oc'h en hem gaout gat re all.

O va Jesus leun a zouzter, bezit va Salver a ne vezit ket va barneur.

Anter kant derves beveach ma vezo

lavaret ar c'houmziou-ze a greis ar galoun, a mar ho levereur bemdis epad ur bloas Induljansou plenier da C'houel Sant Jerom Emilian a zo d'an ugent a vis gouere, pe d'an hini a guereur eus an eis derves var lerc'h, a boues koves, kommunia a mont da bidi da un Ilis bennak erves intansion Hon Tad Santel ar Pab.

GUINIVELES HOR SALVER.

Hunan eus an deiziou kaer eus ar bloas eo Gouel Nedelek; da guénver an deis-ze eo e teuas Hor Salver en hon toues. An neb a rai un navet araok Nedelek a c'hounezo bemdis tri c'hant derves Induljansou, ak Induljansou plenier a boues kommunia da zeis Nedelek pe d'an deis a garo eus an eisevetes, a pidi erves intansion Hon Tad Santel ar Pab. Ar pedennou a guereur a elleur da lavaret.

DEIS NEDELEK.

Kant vloas o vont da zervich ar pelgient; kant vloas o klevet an

Overn, kant vloas da c'housperou an deis araok; kement all da c'housperou deis Nedelek, a boues beza bet o koves ak o kommunia.

Evit ar re a ziskoes kaout souch eus ar pezh en deus great Hor Salver evitho.

1^o HËNT AR GROAS.

Hënt ar groas en deus an oll Induljansou a c'hounezeur o vont d'al lec'hioù e pere en deus Hor Salver bet kement all da c'houzaon en deis diveza eus he vues, ak e tleat kridi e renk beza bras an Induljansou-ze.

1^o Mont a dleat eus an eil taolen d'eben a c'houm un tachad dirak peb hini, nemet ne elfet ket chench plass gat an engroz a ve neuze eo aoualac'h trei oc'h an taolennou; 2^o Ar pedennou a guereur a elleur da lavaret; ar pezh a c'houlenn Hon Tad Santel ar Pab eo ma poaniet da glask koumpren petroump bet koustet gouskoude d'an Autrou Doue; 3^o Eves m'en deus lavaret Hon Tad Santel ar Pab Pi IX, an

31 a vis gouere 1858 eo ret mont er memes tro da bidi dirak ar pevarzek taolen, a n'oar ket evit ober Hant ar Groas a bennadou; 4^o Ar re n'int ket evit mont d'an Ilis da ober Hant ar Groas Abalamour ma int klân, mac'h aignet, kouls ak ar re zo dies dezho mont d'al leac'h ma ema an taolen-nou a ell gounid an Indulgansou m'ar o deus ur Groas beniziet gat ur belek ak en doa ar c'halloud da lakat an Indulgansou-ze. Po devezo c'hoant da c'hounid an Indulgansou e kemerrint ar Groas en ho dourn ak e lavarrint ur Bater ak un Ave evit peb taolen, a goude; pemp Pater, pemp Ave a pemp Gloria Patri; var lerc'h ar pemp Pater-ze ur Bater, un Ave ak ur Gloria Patri evit Hon Tad Santel ar Pab.

2^o SEIS GOENEUR AR C'HORAI.

Tri c'hant derves beb goeneur eus ar c'horais a boues mont da bidi da un Ilis bennak erves intansion Hon Tad Santel ar Pab, a lavaret gat ur guir c'hlac'har dirak ar Groas seis Pater, seis Ave a seis Gloria Patri, ak In-

dulgansou plenier, d'an hini a gue-reur eus ar seis goeneur gat ma zear da goves, da gommunia, a ma vezo pedet evit izomou an Ilis. An neb a rai ar memes tra da ur goeneur all a c'hounezo ive tri c'hant derves Indulgansou, a mar her gra seis goeneur dioc'h-tu e zeus Indulgansou plenier d'an hini a garo a boues koves, kommunia a pidi evit izomou an Ilis.

3^o GOENEUR AR GROAS.

Indulgansou plenier da guement a bedo epad teir heur dioc'h-tu da ve-neur ar Groas o sounjal goella ma ello er pezh a reat en deis-ze d'an Autrou Doue var Menes Kalvar, a boues beza bet o kommunia d'ar Yaou Amblit pe beza e souch da vont er zizhun var lerc'h; ar pedennou a gue-reur a elleur da lavaret. Da beb goe-neur all eus ar bloas eus daou c'hant derves Indulgansou a boues tremen un nebeud amzer o sounjal e poa-niou a maro Hor Salver, a mar pe-deur evelenn beb goeneur eus ar mis

e zeus Induljansou plenier, d'an deis a guereur, a boues koves, kommunia d'ar goeneur diveza a tremen teir heur amzer o koumpren er pezh a rejot goechall d'Hor Salver.

Gouel ar Sakramant.

1° Daou c'hant derves d'an deis araok Gouel ar Sakramant a boues mont da goves, yun pe ober un dra all e leac'h ar yun erves m'en devezo lavaret ar c'honfessour; 2° Pevar c'hant derves d'ar gousperou kenta; pevar c'hant all o vont d'an Overn da C'houel ar Sakramant a kement all o vont d'ar gousperou; 3° Daou c'hant derves o vont var lerc'h ar procession da C'houel ar Sakramant ak epad an eisvetes a boues beza bet o kommunia; 4° Daou c'hant derves o vont d'an Overn epad eisvetes ar Sakramant.

Yaou Amblit.

Induljansou plenier d'ar Yaou Amblit a da C'houel ar Sakramant a boues

tremen un heur o trugarekat an Autrou Doue eus ar vadeles en deus da veza o choum en hon toues er Sakramant eus an Auter, a mont da gommunia en deiziou-ze pe en deis a guereur eus ar sizhun var lerc'h. Tri c'hant derves Induljansou da beb Yaou all eus ar bloas, a boues tremen un heur dirak ar Sakramant.

Evit ar re a Gommuni alies.

1° Pemp bloas evit kement a yelo da goves a da gommunia d'an deiziou Gouel a boues pidi evit Hon Tad Santel ar Pab; 2° Evit ar re zo boas da gommunia ur veach er mis da nebeuta, da C'houeliou Hor Salver, da re ar Verc'hes ak an Ebestel a da C'houel Yan, dek vloas Induljansou bevech ma tisteont oc'h an daol zantel, ak Induljansou plenier da C'houel Sant Patron ar barres, a boues koves, kommunia a pidi evit Hor Mam Santel an Ilis.

Gorren Doue en Overn bred.

1° Ur bloas evit kement hini a yelo var bennou he zaoulin da bidi Doue pa zoun ar c'hloc'h evit gorren Doue en Overn bred; 2° Daou vloas o vont neuze d'an Ilis ak o pidi eno Hor Salver eus a greis he galoun.

Evit mont var lerc'h an Autrou Doue pa gasseur ar gommunion d'arre glân.

1° Seis vloas a taloudegues seis Korais mar dear var lerc'h an Autrou Doue gat ur pilet alum en dourn; 2° Pemp vloas a taloudegues pemp Korais ma neus ket a bilet; 3° Kant derves evit an neb ne ell ket mont var lerc'h an Autrou Doue mar lavar ur Bater ak un Ave evit izomou an Ilis.

Deiziou ened pe vorlarjes.

Kaer e goelet ar guerent ak an amezeyen oc'h en hem zarempred, a mar deus bet un dra bennak entrezo var

ar bloas, oc'h ankonoc'hat an traouze abars ma tigoro an amzer Zantel eus ar c'Horais, a ma vije en doareze eo e tremenjemp hor morlarjes ne vije guer da lavaret, ar c'hountrol eo; hoguen lavaret a ve great n'oump evit ober netra evel ma koez, a zo ken, he c'houzoud a reomp oll, e daou benn ar bloas neus poent ebet ak a raet kement a bec'hijou enna evel epad morlarjes, e doare pa n'en deffe an Autrou Doue netra da velet var-nomp epad an deiziou-ze! ak eo tud ak a c'hoar gouskoude e zeus ur vues all, ur barados ak un ivern, eo a ra an dra-ze! pe leac'h ema eta ho feis, mar o deus? e meur a barres ec'h expozeur ar sakr epad an deiziou-ze, ak ur blijadur vras a raemp d'an Autrou Doue o vont neuze da bidi dirak ar Sakramant. Mar deus kaloun en bor c'hreis or bezet da vihana trues o velet ar pezh a rear d'an Autrou Doue a diskoezomp no deus ket he oll vugale troet kein dezha. Induljansou plenier-zo ive o vont da bidi dirak ar Sakramant pa ves expozet da zei-

ziou morlarjes, a boues beza bet o koves ak o kommunia, a pidi erves intansion Hon Tad Santel ar Pab.

Bez Hor Salver.

1° Induljansou plenier d'ar Yaou Amblit a da veneur ar Groas a boues beza bet o koves ak o kommunia, a mont un tachad da bidi da vez Hor Salver, da lavaret eo dirak al leac'h m'eo lakeat ar Sakramant; ar gomunion a elleur da ober ive da Zul Fask;

2° Dek vloas bevech ma zear en daou zerves-ze da bidi dirak bez an Autrou Doue, a boues beza e sounch da vont da goves kenta ma elleur.

Pange lingua, etc.

1° Tri c'hant derves ur veach bemdis o lavaret ar *Pange lingua* gat: *Panem de cælo*, etc., ak an orezoun: *Deus qui nobis*, etc.

2° Kant derves o lavaret an *Tantum ergo* gat orezoun ar Sakramant;

3° Induljansou plenier d'ar Yaou Amblit, da C'houel ar Sakramant a d'an deis a guereur eus an eisvetes evit kement hini en devezo lavaret dek goeach er mis da nebeuta ar *Pange lingua* pe an *Tantum ergo*, a boues koves, kommunia a pidi en un Ilis bennak erves intansion Hon Tad Santel ar Pab.

*Meulet a trugarekeat ra vezo
bepret an Autrou Doue er Sakramant
Santel eus an Aoter.*

1° Kant derves ur veach bemdis o lavaret ar bedennik-ze gat ur guir c'hlaç'har d'ar pec'hijou; 2° Kement all o lavaret anizhi pa zoun ar c'hloc'h evit gorren Doue en Overn pe evit ar venediction; 3° Tri c'hant derves beb yaou eus ar bloas, a bemdis epad eisvetes ar Sakramant a boues he lavaret teir goeach; 4° Induljansou plenier ur veach er mis evit an neb en devezo he lavaret bemdis a boues koves, kommunia d'an deis a guereur a pidi evit an Ilis.

Kaloun Jesus.

NAVET EN HENOR D'AR GALOUN ZAKR.

4^o Tri c'hant derves bemdis evit kement a rai un Navet en henor da Galoun Hor Salver; 2^o Induljansou plenier d'an deis a guereur eus an Navet pe eus an eis derves var lerc'h, a boues koves, kommunia, a pidi evit an Ilis ak evit Hon Tad Santel ar Pab.

Gouel Kaloun Jesus.

Induljansou plenier da C'houel ar Galoun Zakr a zo d'an eil Sul eus a eisvetes ar Sakramant, a boues koves, kommunia a mont da bidi da un Ilis e pehini e rear en deis-ze Gouel ar Galoun Zakr. Pidi a dlear evit izomou an Ilis.

Taolennou ar Galoun Zakr.

Seis vloas a taloudegues seis Korais o vont da bidi un tachad dirak Taolenn Kaloun Hor Salver, mar dema an daolen-ze en un Ilis, en ur Chapel pe

var un Aoter bennak. Pidi a dlear evit izomou an Ilis; ak an Induljansou-ma a elleur da c'hounid ken alies a ma kereur.

Evit an neb a dremenno un heur en Ilis ar Barres zo he sro da veza dirak ar Sakramant.

Kentoc'h on deus lavaret ur guer bennak divar benn Breuries ar Sakramant; Ma pliche gat an Autrou Doue e ve atau e kement parres zo hunan bennak da vihana dirak ar Sakramant! Ne c'hoessimp nemet pa vesimp er barados ar joa en deus Hor Salver bevech ma vel evelenn he vugale en he guichen.

Un dra all c'hoas ak a ra ur vad vras eo ar pezh zo en hon toues un ugent vloas bennak a zo. Beb pevar bloas e teu tro peb parres da veza un nebeudik dervezioù dioc'h-tu dirak ar Sakramant. En doare-ze zo ken en ur c'horn pe gorn eus hon Eskopti e tle beza atau tud a leis an Ilis en dro d'Hor Salver; an dra-ze da vi-

hana a zo sounjet. Ret eo anzañ evit betek-enn neus nemet meuli Doue da ober, kaer zo ken e zear, da vihanañ var ar meas. It neuze d'an Ilis d'ar poent a guerrot eus adalek m'eo goulaoet an deis a pell zo ken araok epad ar goañ, betek ma ves serret an nos, e kafot atao ar palevars vad eus a dud ar barres ur chapeled en ho dourn en dro d'ho sad karantezus. Salo sur e vijemp ed hor bues en doare-ze e kenver ar Sakramant eus an Auter, hoguen kement-ze atao eo evit Kaloun Jesus-Krist.

Ne gollimp ket, gat Hor Salver oc'h ober evelse, e ellomp beza sur: Gouskoude Hor Mam Zantel an Ilis e deus ouспен roet Indulgansou kaer evit ar re a yelo en deizioù-ze da bidi dirak ar Sakramant eus an Auter.


Indulgansou plenier a boues koves, kommunia a tremen un heur en Ilis ar barres zo he sro da veza dirak ar Sakramant; d'an hini a guereur eus an dervezioù e leur mont, a d'ar poent a vezo kavet essa. Ret eo gouskoude e ve ar sakr expozet d'an heur a

dremeneur evelenn dirak an Autrou Doue; ak ar pedennou a guereur a el-leur da ober.

Veni Creator.

1^o Tri c'hant derves bevech ma vezo lavaret ar *Veni Creator* da zeis ar Pantekost pe epad an eisvetes; 2^o Kant derves oc'h he lavaret d'ar poent all; 3^o Indulgansou plenier ur veach er mis evit kement a lavaro ar *Veni Creator* bemdis epad ar mis, a boues koves, kommunia a pidi evit izomou an Ilis.





KROAZIOU. METALENNOU.

CHAPELEDOU.



1^o INDULJANSOU AN EBESTEL.

Induljansou, galvet Induljansou'n Ebestel, a vez var ar C'hroaziou, ar Metalennoù a Chapeledou pa ves Hon Tad Santel ar Pab he hunan eo en deves beniziet anezho pe'tramant ur belek ak en doa bet digatha ar c'hal-loud da lakat an Induljansou-ze.

1^o Induljansou plenier da zeis Nedelek, da C'houel ar Rouanes, da Bask, d'ar Yaou-Bask, d'ar Pantekost, da Zul an Dreindet, da C'houel ar Sakramant, da C'houeliou'r Verc'hes e Kerzu, Meurs a Goengolo, da C'houel ar Chandelour, da Anter-Eost, da C'houel Sant-Yan, da C'houel Sant Joseph, da hini an oll Zent a da C'houeliou an daouzec Abostol, a boues : 1^o Koves,

kommunia en deizioù-ze a pidi erves intansion Hon Tad Santel ar Pab; 2^o Lavaret da vihana ur veach er zizhun ur Chapeled pe ar seis Salm a Binigen, pe'tramant beza boas da ziski ho c'hreansou d'ar re all, da vont da velet ar re zo er prizoun pe a zo klân en hospitaliou, da rei'n aluzen dioc'h ar c'halloud, da vont d'an Overn pe d'her lavaret mar doar belek.

2^o Seis vloas a taloudegues seis Korais da oll Goueliou Hor Salver a da re ar Verc'hes; pemp bloas a taloudegues pemp Korais da guement Sul a Gouel zo var ar bloas; kant derves da beh hini eus a c'hoec'h derves ar zizhun, a boues ober d'an deizioù-ze hunan pe hunan eus ar pezh a zo merket a-ze araok; 3^o Induljansou plenier var an dre-menvan a boues koves a kommunia, a ma n'oar evit ober nak an eil nak eguile, lavaret da vihana a c'hinou pe a Galoun an hano Santel a Jesus, kaout ur guir c'hlaç'har d'ar pec'hijou a poania goella guelleur da guemeret ar maro eus a zourn an Autrou Doue; 4^o Daou c'hant derves ken alies

goeach a ma zear da velet ar re a zo er prizoun pe a zo klân en hospita-liou evit rei ur sikour bennak dezho, bevech ma teskeur ho c'hreansou d'ar re all en Ilis pe er gueur; 5° Kant derves o lavaret an Angelus pa zoun ar c'hloc'h dioc'h ar mintin, da gres-deis a dioc'h ar pardaes, pe ur Bater ak un Ave ma ne ouzeur ket an An-gelus. Kement all heb goeneur o lava-ret teir Fater a teir Ave en ur zounjal goella guelleur e poaniou ak e maro Jesus-Krist. Kant derves beveach ma rear an examin a goustians a boues beza e souch mad da vont goelloc'h iviziken a lavaret teir Fater a teir Ave en honor d'an Dreindet, pe'tramant pemp Fater a pemp Ave en honor d'ar Pemp Gouli. Kant derves be-veach ma levereur ar Chapelet, ar Seis Salm gat al litanioù ak ar pe-dennou zo varlec'h, Oviss ar Ver-c'hes, hini an Anaoun, pe ar Gous-perou; a boues beza boas d'ho la-varet ur veach er zizhun da viha-na; 6° Anter kant derves beveach ma rear ur beden bennak abars lava-

ret an Overn pe mont da gommunia; kement all bevech ma pedeùr evit ar re zo en ho samzer diveza o lavaret evitho ur Bater ak un Ave.

Evel a veleùr eta, Induljansou an ebestel a elleur da c'hounid o lavaret ar Rozera pe ar Chapelet, hoguen oc'h ober kals traou all ho gounezeur ive a pa na ve ket zo ken lavaret ar Cha-pelet. Evit ho gounid eo ret kaout ar Groas, ar Vetalen pe ar Chapelet var-nomp pe dirazomp en ul leac'h de-read pa rear ar pezh zo merket evit guelloud gounid an Induljansou.

*Ur guer bennak divar benn ar C'hroaziou,
Metalennou, Chapeledou, etc.*

1° Ar C'hroaziou ak ar Metalennou a renk beza en aour, en arc'hant, e keuvr, en ouarn, dir, askourn pe goat evit ma ve guellet lakat an Induljan-sou varnezho. Kroaziou pe Metalen-nou stean, ploum, plastr pe goer re dano ne vent ket mad. Var ar Chape-ladou e elleur lakat an Induljansou neus fors pe seurt danves zo oc'h ober

ar greun gat ne vessint ket gouskoude tear da derri;

2° Pa ves lakeat Induljansou var ur groas, var ar c'hrist eo e vezont lakeat; he denna a elleur eta dioc'h ar groas ak he lakat var un all eb ma kollet netra eus an Induljansou;

3° Var ar memes kroas e ell beza meur a zeurt Induljansou, evel re an ebestel, re ar maro mad, re Hant ar Groas, etc...;

4° Arabat e ve var ar C'hroaziu pe ar Metalennou nemet Imach Hor Salver, hini an Itron Varia, pe ur zant pe zantes bennak anavezet gat an Ilis evit beza e gloar ar barados.

5° Ak e torfe korden ar Chapelet, ak e zae zo ken ur c'hreunen bennak dagoll, ne goll ket he Induljansou evit an dra-ze. Neus ken da ober nemet lakat ur gorden neves a greun all e leac'h ar re zo kollet nemet kals a ve anezho;

6° N'oar ket evit goerza ar C'hroaziu, Metalennou, Chapeledou ur veach ma ves lakeat Induljansou varnezh a pa n'ho goerset zuz nemet ar

pes a dalient kentoc'h, pe'tramant e kollont an Induljansou;

7° N'oar ket zo ken evit presta anezho evit lakat un all da c'hounid an Induljansou;

8° Ur Groas, ur Vetalen, ur Chapelet var bere oa Induljansou a goll anezho mar ho roomp da un all goude beza hon hunan en hem zervichet anezho. Ma non deus ket en hem zervichet anezho e ellomp ho rei d'an neb a guirimp, a zo ken an neb mon deus roet anezho dezha a ell, mar kar ak abars beza he hunan en hem zervichet anezho, ho rei da un all; hoguen an diveza-ma ne ell muy ho rei da zen pe'tramant e kollent ho Induljansou.

2° INDULJANSOU SANT DOMINIK.

An Induljansou-ma ne vezont lakeat nemet var ar Chapeledou kennebeud na re Santes Berc'het.

1° Kant derves beb Pater a beb Ave evit kement a lavaro ur Rozera pe ur Chapelet gat ur guir c'hlac'har d'he bec'hjou;

2^o Dek vloas a taloudegues dek Korais evit kement a lavaro ur Chapelet var un dro gat re all, a mar her grear teir goech er zizhun da nebeuta, Indulgansou plenier beb Sul diveza eus ar mis a boues koves, kommunia, a mont da bidi en un Ilis bennak erves intansion Hon Tad Santel ar Pab ;

3^o Indulgansou plenier c'hoas ur vech er bloas d'an deis a garo evit an neb en devezo lavaret bemdis da nebeuta ur Chapelet.

Evit gounid an Indulgansou-ma e renkeur kaout ur Chapelet beniziet gat an tadou eus a urz Sant Dominik pe gat ur belek ak en doa ar c'hal-loud da lakat ar seurt Indulgansouze. Sounjal a dlear ive goella guelleur er pezh zo c'hoarvezet gat Hor Salver epad he vues pe da vihana lavaret ar Chapelet a greis ar galoun.

3^o INDULGANSOU SANTES BERC'HET.

1^o Kant derves evit ar Gredo, kement all evit peb Pater a peb Ave a boues lavaret ur Rozera pe da vihana ur Chapelet Santes Berc'het; ak ous-

pen seis vloas a taloudegues seis Korais evit an neb a lavaro ur Rozera a bemzek dizenes ;

2^o Mar bezeur ouspen hunan o lavaret ar Chapelet, kement zo oc'h he lavaret a c'hounezo an Indulgansou mar deo gat ur Chapelet Santes Berc'het eo e levereur anezha; a pa na ve nemet an hini zo o lavaret en deffe ur Chapelet an seurt-ze en he zourn ;

3^o Indulgansou plenier ur vech er mis d'an deis a guereur evit an neb a lavaro bemdis epad ar mis Chapelet Santes Berc'het; a boues mont da goves, da gommunia a da bidi en un Ilis bennak erves intansion Hon Tad Santel ar Pab ;

4^o Indulgansou plenier ur vech er bloas d'an deis a garo evit an neb a lavaro bemdis epad ar bloas Chapelet Santes Berc'het a boues koves, kommunia a pidi en un Ilis bennak evit izomou an Ilis ;

5^o Indulgansou plenier d'an eisvet a vis here evit an neb en devezo lavaret da vihana ur vech er zizhun Chapelet Santes Berc'het, a boues

koves, kommunia a mont d'an Ilis barres pe da un Ilis all a pidi eno evit izomou an Ilis ;

6^o Induljansou plenier en heur ar maro evit kement a zo boas da lavaret Chapelet Santes Berc'het da vihana ur veach er zizhun ;

7^o An neb-en deus varneza ur Chapelet Santes Berc'het a c'hounid daouguent derves o vont d'an daoulin da bidi pa gleo ar c'hloc'h o seni evit angouni hunan bennak. Uguent derves oc'h ober he examin gat ur guir c'hlae'har d'he bec'hijou ak o lavaret teir Fater a teir Ave. Kant derves o vont d'an Overn, o selaou kourmziou Doue, o vont var lerc'h an Autrou Doue pa gasseur ar communion d'ar re glân, o poania da lakat ur pec'heur bennak da zont enna he hunan, oc'h ober neus fors petra en honor d'Hor Salver, d'ar Verc'hes pe da Zantes Berc'het a boues lavaret teir Fater a teir Ave.

Evit gounid an Induljansou-ma eo ret ive :

4^o E ve bet beniziet ar Chapelet gat

ur belek ak en doa ar c'halloud da lakat an Induljansou-ze ;

2^o Kaout anezha en dourn a touch oc'h ar greun dre ma zear nemet oc'h he lavaret e vet gat un all ; hoguen neuze an neb zo o lavaret ar Chapelet a renk touch oc'h ar greun ;

3^o Ret eo c'hoas lavaret ur Chapelet a bez a ne c'hounizeur an Induljansou nemet pa vez echu. N'oar ket evit he lavaret a bennadou erves m'en deus lavaret Hon Tad Santel ar Pab Pi IX, neus fors pe seurt Induljansou a ve varneza.

Ar c'his zo da lavaret tri Chapelet, hunan evit an Ilis, un all evit Hon Tad Santel ar Pab ak an trede evit an neb en deus lakeat an Induljansou ; an dra-ze gouskoude ne ket ret evit ma ve guellet gounid an Induljansou.

Hor Chapelet a goessie deomp da gaout atau en hor godel. Goelit eta Sant Franses Xavier a baree ar re glân o touch ebken he Japelet outho. Guir vugale ar Verc'hes a bok atau ive d'ho Chapelet pa guemeront anezha. Nebeud a dra zo aoualac'h evit ober plijadur d'an Autrou Doue.

Angelus.

1^o Kant derves o lavaret an Angelus pa vez ar c'hloc'h o seni;

2^o Induljansou plenier ur veach er mis evit an neb en devezo lavaret an Angelus ur veach bemdis da vihana epad ma vez ar c'hloc'h o seni; koves a dlear ive, kommunia a pidi evit izomou an Ilis d'an deis m'eus c'honant da c'hounid an Induljansou.

An Angelus a dlear da lavaret var benn an daoulin nemet da zadorn da bardaes d'ar Sul ed an deis ak en amzer Fask, neuze e tlear beza er sa. Eus adalek sadorn Fask betek sadorn an Dreindet e levereur ar *Regina Cœli* e leac'h an Angelus; gouskoude an neb ne oar ket ar *Regina Cœli* a ell lavaret an Angelus. An neb ne gleffe ket ar c'hloc'h pa vez o seni a c'hounezô an Induljansou a boues lavaret an Angelus d'ar mare m'oar boas da zeni an Angelus.

Neus ket c'hoas al lod amzer-ze n'oa ket hunan en hor bek douar, da vihana evit var ar meas ak a joumje eb

lavaret he Angelus. D'an taol kenta eus ar c'hloc'h edo buan an tokou d'an traon neus fors oc'h ober petra e vijet. Siouas! e kenver ar poentma e laoskear kouls ak e kenver kals traou all, a ma na gueromp dioual n'oun ket e pe leac'h ec'h en hem galsimp eb dale. Beac'h on devezo o taloud hon tud koz! Ar memes hænt gouskoude zo hirio da vont d'ar barados evel a yoa goechall.

Litanïou'r Verc'hes.

Litanïou'r Verc'hes zo ur beden ak a levereur e toues ar gristenien meur a gant vloas zo. E tlesemp eta kaout joa outhi ak he lavaret hon hunan alies abalamour d'an dra-ze a pa ne ve ken. Hon Tadou a yea ker kaer ak o doa kement a'zoujans Doue! Ur veach eta ma ellomp gouzoud penaus a raent evit beza deuet mad gat an Autrou Doue evel ma zoant, greomp ec'heisto a kemeromp ar memes hænt. Ar Verc'hes Vari e deus hirio kement a c'halloud evel e doa goechall, a ne

c'houlen ket vell eguet hor sikour. Hoguen ma ne fell ket deomp anaout oump peorien, mar deo fae ganeomp asten hon dourn evit he fidi, penaus e fell deoc'h e deffe trues ouzomp ? A ne leveromp-ny ket alies neus netra ken dizoare evel ur paour absolu ?

Hon Tadou Santel ar Pabet o klask e teuemp da ober alies ur beden ak e deus ed ar veach tennet kement a c'harrassou var vugale Doue o deus roet Induljansou kaer da guement a lavaro al Litanioù.

1^o Tri c'hant derves beveach ma le-reur anezho ;

2^o Induljansou plenier da C'houeliou'r Verc'hes e Goengolo, Kerzu a Meurs, da C'houel ar Chandelour a da Anter-Eost evit an neb ho lavar bemdis a boues koves, kommunia a mont da un Ilis bennak da bidi evit izomou an Ilis.

Mis Mae.

An den zo un dra zies aoualac'h da goupren. Sulvui a vezo roet dezha

eus a eurusdet ar bed-ma, sul c'hoas-soc'h e rai d'an Autrou Doue. Goelit eta ar re ne vank netra dezho var an douar, o deus danves, aour, arc'hant, leveou, yec'het ar pezh a gueront, ak e toues ar re-ze e kafot an dud a zoujans Doue ! Hunnanik bennak a ve kavet ; nak hèn a zo gouskoude nebeud ak a gar e guiriones an Autrou Doue e toues an seurt-ze !

Ak en doare-ze, siouas ! emoump gat kement zo. Petra ouffe lakat skleroc'h dirak hon daoulagat ar joa en deus an Autrou Doue ouzomp eguet ar gaerder eus an neves amzer ak eus an anv ? E doare zo ken pa ve an Autrou Doue o klask ober deomp ankonoc'hat an nebeudik diezamant a poan a ellomp da veza bet gat ar yenien ak ar riou keit a ma e padet ar goan. E pe du bennak e taolomp hon daoulagat e velomp an traou o tiouan ak o kriski a leis an douarou ak ar foenneyer ; ak eus a guement a velomp o sevel neus ket zo ken un delien na grife ouzomp en he yez ema an Autrou Doue e souch da rei bara deomp

ur blavez-all. A gouskoude ne deo nemet re vir, oc'h ur pec'het a ves great var ar goan e rear alies meur a gant var an anv. Na pe seurt plijadur eta a ell an Autrou Doue da gaout oc'h ober evit tud ec'heistomp-ny?

Evelse ive an dud a zoujans Doue no deus bet biskoas nemeur a ebad o velet an anv o tostat, a kerkent a ma valent an neves amzer o tiguéri e poanient da veza muy var evez razho ho hunan. Mont a reant ispicial da gaout ho Mam an Itron Varia ak he fidi a reant aliessoc'h c'hoas ma vije ataou en ho c'hichen a krog en ho dourn en aoun na deujent da goeza evel kement a re all.

A ny ive a rae kaer mont d'ar mareze epad ur mis d'ar skol gat ar Verc'hes; a non deus-ny ket kement a izom a den all da gaout aoun rak ar pec'het? a non deus-ny ket hor silvidigues da ober kouls a mo doa ar zent?

Induljansou kaerzo ouспен evit kement a rai un dra bennak e deiziou mis Mae en henor d'ar Verc'hes Vari.

1^o Tri c'hant derves ur veach bemdis a boues ober un dra bennak en henor d'an Itron Varia;

2^o Induljansou plenier d'an deis a guereur a boues beza great pe beza e souch mad da ober bemdis un dra bennak en henor d'ar Verc'hes Vari; ret eo ive koves, kommunia a pidi evit izomou an Ilis d'an deis m'eus c'hoant da c'hounid an Induljansou. An Induljansou plenier-ma ne c'hoare ket gatho evel gat kals Induljansou plenier all on deus koumzet anezho kentoc'h a ne vezont gounezet nemet great e ve epad ur miz ar pes a zo goulennet. Induljansou mis mae a elleur er c'hontrol da c'hounid en deis a guereur eus ar mis.

Salve Regina. — Sub tuum.

1^o Kant derves ur veach bemdis, seis vloas a taloudegues seis Korais beb sul eus ar bloas evit kement a lavaro dioc'h ar mintin ar Salve Regina, a dioc'h ar pardaes ar Sub Tuum, etc... evel ma emint ama var lerc'h;

2° Induljansou plenier diou' veach er mis, d'an daou zul a garo, evit an neb a lavaro bemdis ar pedennou-ma epad ar mis, a boues koves, kommunia a pidi evit izomou an Ilis. Kement all da oll Goueliou'r Verc'hes a da C'houel an oll Zent a boues ober ar memes tra;

3° Induljansou plenier en heur ar maro evit kement a vezo bet boas da lavaret ar pedennou-ze epad ho bues, a boues koves, kommunia, pe ma n'oar ket evit ober, kaout da vihana ur guir c'hlaç'har d'ar pec'hijou.

Salve, Regina, Mater misericordiæ; vita, dulcedo et spes nostra, Salve. Ad te clamamus exules filii Evæ; ad te suspiramus, gementes et flentes in hac lacrymarum valle. Eia ergo, advocata nostra, illos tuos misericordes oculos ad nos converte, et Jesum, benedictum, fructum ventris tui, nobis post hoc exilium ostende. O clemens! o pia! o dulcis Virgo Maria!

Ÿ. Dignare me laudare te, Virgo Sacra,
R. Da mihi virtutem contra hostes tuos.
Ÿ. Benedictus Deus in sanctis suis,
R. Amen.

Sub tuum præsidium confugimus, Sancta Dei Genitrix; nostras deprecationes ne despicias in necessitatibus nostris, sed a periculis cunctis libera nos semper, Virgo Gloriosa et benedicta.

Ÿ. Dignare me laudare, etc..., *evel araok.*

Kaloun douss a Vari, va list da vont da guzat en ho kichen. Eno nem bo' aoun rak netra.

1° Tri c'hant derves beveach ma levereur ar bedennik ma a greis ar galoun;

2° Induljansou plenier ur veach er mis evit an neb he lavaro bemdis epad ar mis, a boues koves, kommunia a mont da bidi da un Ilis bennak erves intansion Hon Tad Santel ar Pab.

Memorare.

1° Tri c'hant derves beveach ma levereur ar MEMORARE gat ur guir c'hlaç'har;

* 2° Induljansou plenier ur veach er mis d'an deis a garo evit an neb en devezo lavaret ar beden-ma bemdis epad ar mis a boues koves, kommunia, a mont da un Ilis bennak da bidi evit izomou an Ilis.

Memorare, o piissima. O pezet sounch, o Guer-Virgo Maria, non esse au- c'hes Vari leun a drugares, ditum a sæculo quemquam neus biskoas klevet e ve ad tua currentem præsidia, eat den da goll eus a gue-tua implorantem auxilia, ment zo eat d'ho kaout evit

tua petentem suffragia esse
derelictum. Ego tali anima-
tus confidentiâ, ad te, Vir-
go Virginum, Mater, cur-
ro; ad te venio, coram te
gemens peccator assisto.
Noli, Mater Verbi, Verba
mea despiciere sed audi pro-
pitia et exaudi. Amen.

goulen beza sikouret a
diouallet ganeoc'h. Leun
ive a fizians, o Goerc'hes
ar Goerc'hezet a va Mam
garantezus, e tiredan betek
ennoc'h, a kroumet dindan
kement all a bec'hijou ec'h
en hem daolan d'an douar
evit ho pidi. Na rit ket a
fae var va fedennou, ho-
guen selaouit ac'hanon, a
kemerit ac'hanon evit ho
krouadur. Evelen bezet
great.

Stabat, etc.....

Kant derves beveach ma levereur
ar beden-ma.

UN HEUR VAR AR BLOAS EN HENOR D'AN *
ITRON VARIA A C'HLAC'HAR.

Induljansou plenier ur veach er bloas
d'an deis a garo evit an neb a dremeno
un heur o koumpren goella guello er
galounad e doue ar Verc'hes da varo
Hor Salver; koves a kommunia a
dlear en deis-ze; hoguen ar peden-
nou a guereur a elleur da ober.

Seis Ave Maria gat ar Sancta Mater.

1^o Tri c'hant derves Induljansou ur
veach bemdis evit kement a lavaro
seis Ave Maria gat ar c'houmzou-ma
eus ar Stabat.

Sancta Mater, istud agas;
Crucifixi fige plagas
Cordi meo valide.

Grit, o Mam a c'hlac'h ar, ma vezo gouliou va Salver
doun em c'haloun.

2^o Induljansou plenier ur veach er
mis evit an neb a ra bemdis ar be-
den-ze a boues koves, kommunia a
pidi evit izomou an Ilis.

UN HEUR DA VENEUR AR GROAS A DA BBB
GOENEUR EUS AR BLOAS.

1^o Induljansou plenier evit kement
a dremeno un heur pe da vihana un
anter heur eus adalek teir heur da
veneur ar groas betek kreis-deis da
zadorn Fask o sounjal er boan e doa
an Itron Varia da guenver an deis-ze.
An Induljansou-ze a vezo gounezet
d'an deis ma vezo great ar Pask;

2° Tri c'hant derves d'an neb a rai ar memes tra eus adalek teir heur beb goeneur eus ar bloas betek gouloudeis d'ar zul; a mar her grear beb sizhun Indulgansou plenier ur veach er mis a boues koves a kommunia d'ar goeneur pe d'ar sadorn diveza.

Gouetiou ak a zo Indulgansou oc'h ober Navet en ho henor.

1° Gouel ar Chandelour; 2° Gouel an Archeal Gabriel; 3° Gouel Sant Joseph; 4° Gouel an Itron Varia e Meurs; 5° Gouel glac'har ar Verc'hes; 6° Gouel Kaloun an Itron Varia; 7° Gouel ar Speret Santel; 8° Gouel Kaloun Zakr Hor Salver; 9° Gouel ar Verc'hes d'an eil a vis Gouere; 10° Gouel Sant Visant a Baol; 11° Anter-Eost; 12° Gouel ar Verc'hes e Goengolo; 13° Gouel Sant Mikeal; 14° Gouel an Eles mad; 15° Gouel ar Rozera; 16° Gouel Sant Raphael; 17° Gouel an Anaoun; 18° Gouel ar Verc'hes d'an hunan var'nuguent a vis Du; 19° Gouel ar Verc'hes e Kerzu; 20° Gouel Nedelek.

1° Tri c'hant derves bemdis evit an neb a rai un navet en henor da hunan pe hunan eus ar goueliou-ma, a d'ar poent a garo eus ar bloas; 2° Indulgansou plenier d'an deis a garo eus an navet pe eus an eis derves varlerc'h a boues koves, kommunia a pidi evit an Ilis ak Hon Tad Santel ar Pab.

Evit ar re a bed evit ar re zo en ho amzer diveza.

1° Tri c'hant derves beveach ma pedeur evit ar re zo en ho amzeriou diveza. Lavaret a dlear teir Fater en henor da varo Hor Salver a teir Ave en henor da anken an Itron Varia epad m'edo he mab oc'h ar groas;

2° Indulgansou plenier ur veach er mis evit ar re a bedo evelenn bemdis epad ar mis.

Indulgansou plenier en heur ar maro.

Kals pedennou ak oberou mad zo ak o deus Indulgansou plenier evit

heur ar maro, evel on deus goelet ;
 evit gounid an Induljansou-ze eo ret :
 1^o Beza great ar pedennou pe an oberou-ze evel m'eo merket evit peb hini epad ar vues ; 2^o Beza e stad a c'hraas ;
 3^o Lavaret a Galoun an hano Santel a Jesus ma n'oar evit he lavaret a c'hinnou ; 4^o Poania da guemeret ar maro evel m'eo roet gat an Autrou Doue , hén a c'hoar goella peur eo poent hor c'herc'hat ac'hann.

Koumziou Doue.

1^o Seis vloas a taloudegues seis Korais bevech ma teuar da zelaou ar belek en deus karg eus ar barres pa brezek Koumziou Doue , evel m'eo ret dezha ober, da Zul a d'ar Goueliou berz ;

2^o Induljansou plenier da Nedelek, da C'houel ar Rouanes , da C'houel Pêr, da Bask, d'ar Pantekost, a boues koves, kommunia a mont en deiziou-ze da zelaou Koumziou Doue.

An Induljansou-ma zo ive evit ar

Bersounet kouls ak evit ar re a ves o prezek en ho flass.

Katekismou.

1^o Seis vloas a taloudegues seis Korais beveach ma rear Katekismou pe ma zear d'he zelaou d'an deis ma vezeur bet o koves ak o kommunia ;

2^o Induljansou plenier da Nedelek , da Bask a da C'houel Per evit kement zo boas da ober Katekismou pe da vont d'he zelaou a boues koves, kommunia a pidi evit izomou an Ilis ;

3^o Ar re nemint ket c'hoas en oad da gommunia a c'hounezo tri bloas da oll Goueliou'r Verc'hes mar dint boas da vont da zelaou ar C'hatekismou en Ilis pe el leac'h ma rear skol ; mont a dleont gouskoude da goves ;

4^o Seis vloas evit ar re zo oc'h ober skol bevech ma kassint ho bugale da zul pe da c'houel d'al leac'h ma rear Katekismou, a ma raint ho hunan Katekismou dezho ;

5^o Kant derves beveach ma raint Katekismou d'an deiziou pemdiz ;

6° Kant derves evit an tadou ak ar mamou bevech ma reont Katekismou d'ho bugale pe d'ho flac'het a do mevellou ;

7° Kant derves beveach ma tremeneur un anter heur o poania da ziski ar G'hatekismou pe evit he c'houzoud an hunan pe evit guelloud he ziski da re all.

Evit an neb a roi da zibri da dri faour en' henor da Jesus, Mari a Joseph.

1° Seis vloas a taloudegues seis Korais evit an neb her grai o kaout en he galoun ur guir c'hlac'har d'he bec'hijou ;

2° Indulgansou plenier mar deo bet en deis-ze o koves ak o kommunia a boues pidi evit izomou an Ilis ;

3° Kant derves evit kement zo en he dy mar taolont an dourn evit sikour anezha da ober un dra ak a rai kement a blijadur da galoun trugarezus Hor Salver kouls a d'an Itron Varia a Sant Joseph.

An oll Indulgansou zo menek anezho en drede Kevren-ma a elleur da c'hounid evit an Anaoun.

Evit ar re a ya da velet an dud klân.

1° Daou c'hant derves beveach, mar o deus un dra bennak ak a so beniziet, ur Groas, ur Vetalen, ur Chapellet ; he gaout a dleont varnezho evel hon deus lavaret kentoc'h ;

2° Tri c'hant derves mar dema Indulgansou Santes Berc'het var ho Chapellet ;

3° Tri c'hant derves mar demeure Breuries ar Rozera ;

4° Kant derves evit ar re a zo e Breuries ar Sakramant, en hini ar Skapular pe e Breuries ar Feis.

An Indulgansou-ma zo ive evit mont da velet ar re zo er prizoun. Ho gounid a elleur evit an Anaoun.

De profundis.

1^o Kant derves bevech ma levereur var benn an daoulin an *De profundis* er penn kenta eus an nos. Var lerc'h an *De profundis* e renkeur lavaret : *REQUIEM ÆTERNAM DONA EIS, DOMINE, ET LUX PERPETUA LUCEAT EIS. REQUIESCANT IN PACE, AMEN.* An neb ne c'hoar ket an *De profundis* a c'hounezo an Indulgansou o lavaret ur Bater, un Ave a *Requiem æternam, etc....*;

2^o An neb a lavaro ar beden-ma bemdis epad ur bloas en deus Indulgansou plenier ur veach var ar bloas, d'an deis a garo, a boues koves, kommunia a pidi evit izomou an Ilis ; ak an Indulgansou-ma a elleur da rei d'an Anaoun.

Ur beden all evit an Anaoun.

1^o Tri c'hant derves evit an neb a lavaro, o kaout en he galoun ur guir c'hlaç'har d'he bec'hijou ak o poania goella guello da zounjal er pez en doue Hor Salver da c'houzaon, pemp Pater a pemp Ave Maria gat ar c'houlmziou-

ma : *O pezet, o va Doue, trues oc'h ho pugale, pa zint koustet deoc'h ar priz eus ho koad ; erfin e tleat lavaret : REQUIEM ÆTERNAM, etc....*;

2^o An neb a lavaro ar beden-ma bemdis epad ur mis en deus Indulgansou plenier d'an deis a garo eus ar mis a boues koves, kommunia a pidi evit izomou an Ilis. An Indulgansou-ma a elleur da c'hounid evit an Anaoun.

Seis Salm a Binijen.

Daouguent derves bevech ma vezo lavaret ar Seis Salm a Binijen ak a elleur da rei d'an Anaoun.

Orezoun a Galoun.

1^o Indulgansou plenier ur veach er mis evit an neb a rai bemdis un Anter heur pe da vihana ur c'hart heur orezoun, da lavaret eo, a joumo bemdis ur c'hart heur d'an nebeuta da gompren en Autrou Doue a da boania d'en hem zével etreuzek ennha. Koves a renkeur, kommunia a pidi

evit izomou an Ilis d'an deis m'eus souch da c'hounid an Induljansou ;

2^o Induljansou plenier ur veach er mis evit ar re a ziskoezo alies penaus e tleat ober orezoun, a boues koves, kommunia a pidi evit izomou an Ilis. Ar re a velo d'ho selaou o devezo ar memes Induljansou mar deont alies, a boues gouskoude koves, kommunia a pidi evit izomou an Ilis ;

3^o Seis vloas a taloudegues seis Korais beveach ma tiskoezeur an doare da ober orezoun a boues beza bet o koves ak o kommunia. Ar re a ya da glevet o deus ive ar memes Induljansou a boues beza bet o koves ak o kommunia.

An Induljansou-ma a elleur da rei d'an Anaoun.

*Angele Dei pe e brezounek Eal
Doue, etc.*

1^o Kant derves beveh ma levereur an Angele Dei gat ur guir c'hlac'har d'ar pec'hijou ; 2^o Induljansou plenier d'an eil a vis here evit kement o

devezo lavaret ar beden-ma mintin a nos epad ar bloas ; koves a kommunia a rañt en deis-ze a mont da bidi da un Ilis bennak erves intantion Hon Tad Santel ar Pab ; 3^o Induljansou plenier ur veach er mis, d'an deis a garo, evit an neb en devezo lavaret ur veach bemdis da nebeuta an Angele Dei a boues ober ar pes a c'houlenneur peurvuya evit an Induljansou plenier ; 4^o Induljansou plenier en heur ar maro evit an neb en devezo lavaret alies ar beden-ma epad he vues. Ak an oll Induljansou-ma a elleur da c'hounid evit an Anaoun.

Peden dirak ar Grusifi.

« O Jesus dous a mad, chetu me var bennou va daoulun dirazoc'h. Me o ped eus a greis va c'haloun, leunet ac'hanon a Feis, a Esperans ak a garantas. Lakit ennon ur guir c'hlac'har d'am pec'hijou, a va distroït kement dioc'h an drouk n'em be muy ken souch nemet da guerzet en hænt eus o Kourc'hemennou. Grit kement-se epad m'am goellit o poania da gompren petr'oc'h eus great a gouzånvet evidon ak o c'hoalc'hi ho kouliou sakr gat va daelou, o kaout dirak va daoulagat, o Jesus leun a vadeles, ar pez a lavare David ho profet en ur barlant ac'hanoc'h : *toullet o deus va sreid a va daouarn, freuzet o deus kement va c'horf sakr ma elfet kounta kement askourn a zo ennh.* »

Induljansou plenier evit kement a lavaro ar beden-ma dirak ur Grusifi a boues beza bet o koves ak o kommu-
nia a pidi un tachadik erves intansion
Hon Tad Santel ar Pab.

An Induljansou - ma a elleur da
c'hounid evit an Anaoun.



TAULEN.

PAGEN

Petr'éo an Induljansou ?	4
Ak izom or be-ny a Induljansou ? ..	12
Induljansou plenier	26
Induljansou disteroe'h	27
Petra zo da ober evit gounid an In- duljansou ?	28
A ret eo mont da goves pa vez Indul- jansou da c'hounid ?	34
Ar Gommunion	32
Petra dlear da entent pa levereur eo ret pidi erves intansion an Ilis...	32
Induljansou evit an Anaoun	33
Ak e stad a c'hress eo ret beza	33
Breurieziou	38
Breuries ar Sakramant	42
Breuries ar Galoun Zakr	50
Breuries ar Feiz	58
Breuries ar Rozera	63
Breuries ar Skapular	74
Induljansou o vont da bidi da Ilisou Roum	79
Breuries ar Maro mad	82
Breuries an Anaoun	87
Pedennou en honor d'an Dreindet ..	93
Gloria Patri	94

Navet en honor d'an Dreindet.....	95
Aktou a Feis a Esperans, etc.....	95
O va Jesus, trugares.....	96
An haniou a Jesus ak a Vari.....	96
Meulet ra vezo hon Autrou Jesus- Krist, etc.....	97
O va Jesus, leun a zouzder, etc.....	97
Guinivêles hor Salver.....	98
Deis Nedelek.....	98
Hœnt ar Groas.....	99
Seis Goeneur ar c'horais.....	100
Goeneur ar Groas.....	101
Gouel ar Sakramant.....	102
Yaou Amblit.....	102
Ar re a gomuni alies.....	103
Gorren Doue en Overn bred.....	104
Evit mont varlerc'h an Autrou-Doue	104
Deiziou ened.....	104
Bez hor Salver.....	106
Pange lingua, Tantum ergo.....	106
Meulet a trugarekat, etc.....	107
Kaloun Jesus, navet en he honor.....	108
Gouel kaloun Jesus.....	108
Taolennou kaloun Jesus.....	108
Evit tremen un heur en Ilis ar barres zo he sro da veza dirak ar Sakra- mant.....	109
Veni creator.....	111
Induljansou'n Ebestel.....	112
Petre tle beza ar C'hroasiou, Meta- lennou, etc.....	115
Induljansou Sant Dominik.....	117
Re Zantes Bere'het.....	118

Angelus.....	122
Litaniou'r Verc'hes.....	123
Mis Mae.....	124
Salve regina, Sub tuum, etc.....	127
Kaloun douss a Vari, etc.....	129
Memorare.....	129
Stabat.....	130
Un heur en honor d'an Itroun Varia a c'h'har.....	130
Seis Ave maria gat Sancta mater, etc.	131
Un heur da Veneur ar Groas ha da beb Goeneur eus ar bloas.....	131
Goueliou ak a zo Induljansou oc'h ober navet en ho honor.....	132
Evit ar re a bed evit ar re zo en ho amzer diveza.....	133
Induljansou en heur ar maro.....	133
Komziou Doue.....	134
Katekismou.....	135
Evit rei da zibri da dri Faour en he- nor da Jesus, etc.....	136
Evit mont da velet ar re glân.....	137
De profundis.....	138
Ur Beden all evit an Anaoun.....	138
Seis Salm a Binijen.....	139
Orezoun a galoun.....	139
Angele Dei.....	140
Peden dirac ar Grusifi.....	141

FIN.

Diocèse de
Quimper & Léon
250401 Quimper & Léon

Document numérisé en 2016